

Breizh Brevez

“MOGERIOU HOUARN”

eun danevell palestinian

gand **Ghassan Kanafani**

PETRA ZO NEVEZ E KORS ?

Y. Miossec dre Vreiz-Izel

“The Brendan Voyage”

N° 57 - 1982

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezonég mizieg.

Niverenn 57.

Miz eost ha miz gwengolo 1982.

Rener : Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 60 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studieren: 40 lur.
- broiou estrañjour: 90 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennou-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dwason-France, B.P. 40, 91121, Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Disklêriet hervez al lezenn: trede trimiziad 1982.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

Ghassan Kanafani: Mogeriou houarn.....	3
L. Sedar Senghor: barzonegou.....	10
Y. Miossec: O haloupad war henchou Breiz-lzel.....	13
Louis Conq: Hekleo Traoñ Bouzar.....	20
J.B. Stromboni: Penaoz e troio an traou en Enez-Kors?.....	29
Emgleo Breiz: Petra vo roet gand Savary?.....	33
Ar Gelennerien Vrezoneg: Seveni ar promesaou.....	36
F. Falc'hun: Notennoù war an anoioù-leh keltieg.....	38
Mikael Madeg: Tammou traou.....	40
J. Goyat: The Brendan Voyage.....	44
J.S.: «France-Musique» eisteiz e Breiz.....	46

Mogeriou houarn

Heuillet o-deus an oll a-hed an hañv moarvad ar brezel kriz a zo bet e Liban ha dreist-oll endro da Veyrouth etre arme Israel, Tsahal, ha Palestinianed an O.L.P.. Lazet ha gloazet ez eus bet kalz a dud, ha ne oant ket oll soudarded, pell alese - heb konta an distrujoù. Tro on-eus bet da vare an darvoudou-ze da lenn eul leorig bihan a gontadennoù euz ar Palestin, hag ez eus savet c'hoant ennom da drei unan euz an danevellou-ze, ha d'he hinnig da lennerien Vrud Nevez.

Skrivet eo bet al leor-mañ gand Ghassan Kanafani. Hervez a pez a skriv en e raglavar Ibrahim Souss, hag a zo kannad an O.L.P. e Pariz, eo bet Ghassan Kanafani unan euz ar henta skrivagnerien palestinian o tiplega en e skridoù trubuilhou e bobl goude ma vije bet savet Stad Israel. Ganet e 1936, eo bet lazet e miz gouere 1972, e Beyrouth, gand eur vombezenn a oa bet kuzet en e wetur. Skrivet e-neus pennadoù diwar-benn stourm ar Balestinianed, romanchou ha danevellou.

Tennet eo eta an hini ah embannom amañ euz al leor Contes de Palestine, a zo bet embannet e galleg gand skoazell an UNESCO. Trugarekaad a reom an embannadurioù Stock da veza bet roet deom an aotre d'embann an droidigez-mañ.

J.S.

Ne-noa hini ebed ahanom an disterra douetanñ e oa, er bakadenn hirgarrezeg a oa Hassan bihan o paouez reseo digand eun eont euz a bell, devez e vloaz diouz ar mintin, eur gaoued vihan gand eun evn beo e-barz. Gronnet endro d'ar bugel, e klevem, a-raog m'e-noa roget paper ar pakad hag a oa toullou e-barz, diouaskell o frañval aonig hag eur richanadeg vlod. Koulskoude, n'hellem ket soñjal e vije bet beo an evn. Petra ' helle ober eur bugel bihan euz eun evn gwir?

Eur pennadig amzer goude, e oa digor ar bakadenn. Lammad a reas Hassan war ar gaoued, briata anezi ha starda anezi kreñv, en eur hopal, gand herr :

- Eur filip eo!

A-boan on-oa bet amzer da dôler eur zell ouz ar gaoued hag ouz ar filip. Fromet e oa Hassan, roz e oa deuet e zioujod da veza ha lugerni a ree e zaoulagad, e-keid ha ma ree tro ar pezh heb gouzoud petra oa oh ober. A-benn eun nebeud munutennou, e laoskas ahanom da zelled ouz an evn en e gaoued, o terhel an organell anezien e zorn serret.

Ne oa ket bet laketa liou war ar gaoued, ha goloet e oa he flañchod koad gand eur blakenn gwer lufr. Etre an daou gostez berr, a-hed, e oa bet laketa eur hlud a-istribill. En eur horn e oa bet laketa eur bured bihan evid an dour, hag eul louar evid ar greun en unan all. Dindan toenn ar gaoued, hag a oa dezi stumm eur biramidenn, e oa bet plantet gand evez barrinier houarn moan nevez-flamm. Ouz lein ar gaoued e chome krog an evn kement ha ma helle, deuz e dreid bresk; krena ree en eur heja e benn dibaouez, hag ouzom e selle gand e zaoulagad lugernuz kelhiet a zu. Ruz-skeduz e oa ar pluñv war e benn, pezh a lake e zremm da gaoued eun nerz dihal-loud ha trist. Kadarn a-walh e oa ar zell heb esperañs-se. E-pad eur pennad, ne baouezas ket da lammad etre barrinier ar gaoued hag an doenn. Bewech, e koueze pounner d'an traoñ, e veg gantañ en a-raog etre ar barrinier, o klask en eun doare diroll eun

toull bennag da vond er-mêz. Ar pikou du ha ruz e-noa war e benn a lakae anezañ da gaoued an êr fuloret ha trist war eun dro, trist da ouela. E gorr bihan stennet, e skilfou krizet hag e zaoulagad leun a derzienn a roe da zoñjal e-noa divizet eun dra bennag a hrevuz.

- Perag ne jom ket a-zao eur pennadig?
- Aon e-neus...
- Rag piou?
- Dirazout...

Eur zell a zipit a daolas Hassan ouz an evn. En em houlenñ a ree petra, ennañ, a helle sponta anezañ. War e zremm e veze gwelet penaoz e vez reustl en eur bugel ha ne oar ket ar mod da lakad an traoù a-du gantañ. Neuze eo e tisklêrias va breur hena hag a oa a-dreñv dezañ :

- Nann, n'e-neus ket aon dirazout. N'e-neus ket ar filip a aon.
- Neuze, perag ne baouez ket da fiñval?
- Oh en em ober ema ouz e lojeiz. Ne welez ket? Sell... Ema oh ober anaoudegez gand ar barrinier... Deski a ra en em gaoued er gaoued...

Asamblez e selljom ouz an evn ha ne ree nemed darnijal heb ehan etre ar barrinier. Gwir eo e oa marteze a-walh o kemer ar muzul euz peb tra... Hassan, daoust da ze, a vanke dezañ kaoud responchou resiz :

- Med er gaoued-mañ e oa a-raog erruod amañ... Dizoloi anezi a dle beza bet greet a-raog...
- Prena anezañ e-neus greet da eontr, pe marteze paka anezañ, n'eus ket pell 'zo... N'eus forz penaoz, eun dra bennag a nevez eo ar gaoued... Gweled a reer ze, ken bresk e fiñv.

Koueza a reas or zellou a-nevez war an aneval. Derhel a ree da vranskellad etre ar maillou houarn a oa endro dezañ e-keid ha ma talhe ma breur war ar memez ton sioul :

Euz daou pe dri miz e-neus ezomm eur filip evid en em ober ouz e di nevez. 'Pad keid-se, e talh da studia anezañ gand evez, ha war ar memez tro, e klask eun toull da dehed kuit...

Skoulma a reas Hassan e zaouarn bihan a-dreñv e gein, ha heb distaga e zaoulagad diwar an evn griz marellet ruz gwad :

- Evel-se ema o vond da jom e-pad tri miz?
- Ema.
- N'ema ket o vond da gana e-pad tri miz?
- N'ema ket. Richanad a ray, med ne gano ket.
- Ha goude?
- Marteze e kano.
- Hag en noz, ema o vond da gousked evel dom?
- N'ema ket, en e zao e chomo war e ziouharr. Derhel a ray e zaoulagad digor da zelled endro dezañ...

Ma breur hena hag a ouie ne veze fin ebed da houlennoù Hassan, a guitaas neuze ar pezh. Gouzoud a ouien, me, ne laoskfe ket Hassan ahanon da gousked en noz, e vije dibaouez war-dro an evn, o selled outañ ken aliez gwech ma raje eur finvadenn. Pemp devez pad e oe leuniet e vuhez da Hassan gand an evn. Pedi a ree e gamaraded da zond d'arvesti ouz al loen hag a jome, bremañ, a-zao a-vareadou da rufla barrinier e gaoued; seblantoud a ree al loen anaoud ar horniou, ar c'hwez. Adlavared a ree ar bugel d'e gamaraded ar pezh e-noa va breur lavaret dezañ, ha bewech e kave da astenn e zisklêriaduriou, evel a ra ar vugale, gand eur skeudenn all bennag pe eun taol-kaer bennag oustenn. Koulskoude, ne grede ket re, a gave din, e teuje an evn spontig d'en em voaza ouz e zemeurañs nevez. Meur a wech e tiskouezas din e-noa douetañs, rag ne grede ket komz dezuz se d'am breur hena. Eur wech e houlennas diganin :

- Ma tigor an ar gaoued 'benn tri miz, ha ma laoskan anezañ da vond kuit, ha dond a ray endro?

Ne oan ket evid respont. Ne ouien mann ebed euz buhez nag euz boazamanchoù an evned. Prometi a ris dezañ goulenn disklêriaduriou digand ma breur hena ha dond da gonta dezañ e respont. Pa ris ar goulenn ouz ma breur, e hourdrouzas ahanon :

- N'ez ket da veza genaoueg. En em voaza a ra ouz ar gaoued, da lavared eo e ra e zoñj beva enni dre heg. Med m'en em gav en diavêz d'ar barrinier, ne zistroio ken.

Ne oan ket eet da lared ze da Hassan : arabad e oa luzia an istor, rag tra-walh e oa d'ja evid e vihan a benn. Gwelloc'h e oa dezañ gweled an traoù en e vod. Ezetoc'h e oa, evitañ koulz hag evidom. Euz ar memez aviz e oa ma breur hena. Soñjal a ree zoken e oa eun ide zod kinnig eun evn d'eur bugel. Gand se e oa risket ar peurrest dezuz e vuhez da zond da veza tristoc'h :

- Sell! Dilezet e-neus toud e hoarielloù, al loened plastik, gloan pe lien... Eur milion a evned lien pe blastik ne dalvezont ket an evn milliget-se. Petore ano e-neus roet dezañ?
- Hassoun.
- Petra?
- Hassoun. Ne gompren ket e hellje beza roet eun ano all dezañ.

An deiz war-lerh, e houlennas Hassan arhant diganin da brene eur gaoued vrasoc'h. Santoud a ree a-walh e oa re striz ar henta kaoued da loja nijadennoù leun a derzienn ha dibaouez an evn. Med ne jeñchas seurt ebed gand ar gaoued nevez. Bez' e helle nemetken mond pelloc'h bewech a-denn askell berr. Laouen e oe Hassan evelkent, dreist-oll p'am-oa roet kelou dezañ e oa dezañ da jeñch kaoued d'an evn. Displega a ris dezañ e-noa da gemer anezañ etre e zaouam, heb starda anezañ re beteg gouzoud e lazfe anezañ, med heb lezel gantañ re a blas da nijal kuit.

- Ha ma krog ennon?
- Ze ' dalvezo e stardez re greñv warnañ... Eun tammig bihan e tistardi.
- Ha ma teh kuit?
- Ze ' dalvezo e-teus distardet re.

Selled a reas ouzin heb kompren re vad. Med e stumm pe stumm, e vanke dezañ lakad e-unan an evn euz an eil kaoued en eben, ha gwelloc'h evid na zoñje din a reas. Ha ne zistagas klemm ebed pa zerras an evn e veg war grohenn e zorn. En deveziou war-lerh, e komzas kalz dezuz ze, hag e kredas e gwirionez e oa eurusoc'h ar filip en e gaoued nevez. Med ma breur hena, hag a zelaoue anezañ gand pasianted pa zebrem on dijuni, ne oa ket a-du gantañ, hag henn laras dezañ heb sevel e zaoulagad diwar e asied :

- N'az-teus ket greet mad o prena ar gaoued nevez...
- Perag?
- Eur miz az-teus kollet. En em voaza a rank an evn adkomañs d'ober ouz e zemeurañs nevez. Muioh a ze a amzer a houlennoù ze pa'h eo brasoc'h ar gaoued nevez.

Euz korn ma lagad e taolen pled ouz ar bugel hag a zelle endro dezañ gand tristidigez, en eur glask debri bepred. Med prestig e paouezas, e lakas e loa e-tal e asied hag e sellas ouzin heb finval. O weled petra en em gave gand Hassan, e klaskas ma breur hena distrei war ar pezh a-noa laret :

- Med piou oar? Marteze e plijo e gaoued nevez d'an evn hag en

mousc'hoarz all dezañ. Redeg a reas en eul lamm war-du ar zal-
debri. Kleved a reen e hopadennou a joa oh en em veska gand
trouz e gammejou o tasseni en trepas :

- Chomet eo a-zao! A-zao eo chomet Hassoun!

Neuze e klevis anezañ o tistrei. En em strinka a reas war-du ar
gaoued ha mond adarre war e zaoulin. Gand e zaouarn e tabouline
war e ziuoharr en eur grena a levez. Erruoud a reas erfin ma
breur hena hag e chomas a-zao eur pennadig a-dreñv dezañ, heb
taoler re evez ouz an evn. Med souden, e stouas war an araog,
hag e zaouarn gantañ war bennou e zaoulin, e sellas ouz an aneval,
difiñv bepred, e-keid ha ma talhe Hassan da lared dibaouez :

- 'Welez ket? A-zao eo chomet...

E zaoulagad o selled bepred ouz ar filip, e hejas ma breur e benn
goustadig en eur griza e abrantou, hag e lavaras hepken :

- O vervel ema.

Ghassan Kanafani.

Beyrouth, 1963

Troet ha renket gand J. SALAUN.

Brest, miz eost 1982.

Contes de Palestine, Ghassan Kanafani, embannadurioù Stock.

DILUN, DIMEURZ, DIMERHER....

Rimadellou evid ar vugale

da veza embannet gand ar **BLEUN-BRUG**

Priz evid ar ragprenerien : 15 lur (kuit a vizou-kas).

Notenn : *ne vo embannet al leor-mañ nemed
goude an hañv.*

PEDENN D'AR MASKLOU

Masklou! O Masklou!
Maskl du, maskl ruz, ha c'hwi masklou gwenn-ha-du,
Masklou er pevar horn ma c'hwez diwamo ar Spered
Me ho salud er zioulder!
Ha n'eo ket te da ziweza, va hendad penn leon,
Emaoh o tiwall al leh-mañ ha ne dle digemeret na c'hoarz eur
vaouez nag eur mousc'hoarz o weñvi
Sevel a ra diwamoh eun ézenn a beurbadelez el leh ma alanan
er va Zadou.
Masklou divaskl ho tremmou, n'eus warnoh na merk al levenez
na rouvenn an dristidigez,
C'hwi hag ho-peus prientet ar patron-mañ, an dremm-mañ, va
hini, stouet war an aoter paper gwenn
Heñvel ouzoh, selaouit ahanon!
Setu o vervel Afrika an Impalaerien – evel eur briñsez en he
angouni truezuz –
Hag e varv ive an Europa ma'z om stag outi dre or begel.
Stagit ho sellou digemm war ho pugale lakêt da vevelien
A ro o buhez evel ma ro ar paour e damm dillad diweza.
Ra respontim Ya da vare adzividigez ar Bed
Evel m'eo red ar goell d'ar bleud gwenn.
Rag piou a zeskfe al lusk da ved maro an ardivinkou hag ar
hanoliou?
Piou a yudfe youhadenn al levenez da zihuna anaon ha minored
d'ar ruzell-veure?
Lavarit din piou a rentfe endro memor ar vuhez d'an den toull-
govet e esperañs?
Ar re-ze a lavar om-ni paotred ar hotoñs, ar hafe, an eoul,
Int a lavar om-ni paotred ar maro.
N'om ket, ni eo paotred an dañs hag on treid a adkav o nerz
en eur skei war an douar kaled.

MAOUEZ ZU

Maouez noaz, maouez zu
Gwisket gand da liou hag a zo buhez, gand da stumm hag a zo
kened!
Kresket am-eus en da skeud; douster da zaouarn a zalle va daou-
lagad.
Ha setu e-kreiz an Hañv hag ar Hreisteiz e kavan ahanout Douar
diouganet diwar lein uhel eur menez kraz
Ha da gened a sko ahanon e-kreiz va halon, evel luhedenn eun
erer.
Maouez noaz, maouez teñval,
Frouezenn zarev he bouedenn stard, bamerez moug ar gwin du,
genou o lakaad barzoniez em genou,
Savanenn he dremmweliou glan, savanenn o skrija dindan flou-
radennou birvidig Avel ar Reter,
Tam-tam kizellet, tam-tam stignet o krozal dindan bizied an
Trehour, Da izvouez voud a zo kanenn speredel ar Vuia-Karet.
Maouez noaz, maouez teñval,
Eoul dirouvenn dindan kement ézenn, eoul reiz ouz kroazlez ar
gourenou, ouz kroazlez Priñsed ar Mali,
Gazelenn he mellou neñvel, ar perlez a zo stered war noz da
grohenn,
Faltazi dudiuz ar spered, skleur an aour ruz oh amliva da deñ-
valijenn,
E disheol da bennad bleo e steuz va anken o hortoz ar zav-heol
en da zaoulagad.
Maouez noaz, maouez zu,
Kana 'ran da gened o tremen, stumm a engravan er Beurbadelez,
A-raog na deuio ar Blanedenn aviuz d'az trei e ludu evid maga
gwriziennou ar vuhez.

KENEIL

Keneil,
Me a fell din reugi va hrohenn du,
Gand ma teuio d'am heul,
Me a fell din treuzi da zigemer
Rust, da virou goapauz.

Keneil,
Me a fell din, en eur vond larkoh eged da grohenn rouz rouvennet
Ha da zaouarn,
Spluja en da greiz, beteg da galon
Dener.

L. Sedar Senghor
Brezoneg gand
Naig Rozmor ha Per-Mari Mevel.

Gand aotre hegarad an Editions Robert Laffont hag an Editions du Seuil.

O haloupad war henchou Breiz-Izel

Eun enklask war ar brezoneg

I

Mond da ober eun enklask war ar brezoneg! Kredi a ran ne vije biskoaz deuet em spered, da vihanna outañ e-unan, ar zoñj da lakaad va amzer ha va foan da ober eur seurt tra.

Arabad eo goulskoude, mond da gredi e vije bet dre ma reen fae war ar brezoneg. Biskoaz n'on bet tentet da ober fae warnañ. Ar hontrol eo. Atao em-eus dalhet mad dezañ. Atao ez eo bet kër d'am halon, zoken beb tro ma'z on bet pell ouz Breiz. Eñ eo am-eus desket war varlenn va mamm ha na va buhez na va micher n'o-deus gellet va lakaad d'e ankounac'haad.

Ken aliez ma teuan d'ar gêr, da lavared eo da di va zud, eo eñ eo a deu ganen kerkent ha ma vezan en ti hag ivez kerkent ha ma 'h en em gav ganen eun amezeg bennag euz va yaouankiz, hag an dra-mañ beza ma teu kentoh d'ar re-mañ sevel c'hoant ganto da zrailla galleg ganen. Mii boan am-bez o lakaad anezo da gaozeal brezoneg.

Nann, n'em-eus ket greet fae biskoaz warnañ! Eun druez a gavan zoken gweled kement a dud bremañ o klask gallegad pa n'o-deus leh ebed d'henn ober, evel ma helfe ar galleg o lakaad da gaoud muioh a spered. Eun druez eo dreist-oll gweled ne fell ket ken d'ar mammou yaouank diwar ar mêz deski brezoneg d'o bugale. Penaoz e hellont evel-se klask

taol d'an traoñ yez o zadou koz? Eur yez a vez atao eur binvidigez vraz hag a dlefe an oll klask he derhel en he zao. Kaoud mez outi a zo evidon-me ken gwaz hag ar seurt tra-mañ am-eus gwelet a-nevez 'zo : eur plah yaouank o kaoud mez euz he mamm, eur vaouez a-zoare goulskoude.

En eun egzamin e oe goulennet diganti petra a ree he zad hag he mamm : « Va zad, emezi, a zo implijad en ti-kêr. » Med ne gredas ked lavared petra e oa micher he mamm. Mez he-doa o tiskleria ez a bemdez da labourad da diez ar re all, amañ hag a-hont, ez eo, evel ma lavarer e galleg, *femme de ménage*. Sur eo, eur seurt tra ne oa ket da veza goulennet diganti en egzamin. Med ar plah yaouank (eur plah ugent vloaz!) n'he-doa ket muioh da gaoud mez o rei da anaoud micher he mamm. Homañ a oa an dour en he daoulagad o konta an dra-ze din. Ne gav ket deoh ez eo eun dra diêz da houzañv gweled eur verh o nah he mamm evel-se? Mad. Gweled an dud o tilezel yez o zadou-koz, o nah eur yez ken kaer, a zo ken trist.

Pell 'zo eh en em houlennan petra a dremen e penn mammou yaouank Breiz-lzel eur pennad 'zo? Kavoud a ra dezo marteze e vije re henaoueg o bugale e-kichenn ar Hallaoued vihan, ma lakafent anezo evel a-raog da zeski ar brezoneg hag e teuont da veza speredekoh pa ne zeskont nemed ar galleg. Med pegement eh en em faziont, ar mammou-ze! Pegen berr e rank beza o spered!

Gwir eo n'emañ ket toud an tamall da goueza warno. Gwir eo ez eo bet gwasket dezo o spered pa oant er skol, pa vezent kastizet beb tro ma teue dezo beza paket o kaozeal brezoneg. Med kredi a ran e vezont ivez atizet gand al lorch, o soñjal ma ne ouez o bugale nemed ar galleg ez int surroh da zewel buannoh hag uheloh e-touez an dud. « Ar brezoneg, a lavare unan anezo din a-nevez 'zo, ne zervich ket ken da netra. Perag 'ta neuze lakaad ar vugale da goll amzer o teski anezañ?»

Med ar vamm yaouank-se hag ar re all evelti ne deu ket dezo soñjal ne goll tamm ebed ar Breizad bihan o teski ar brezoneg war varlenn e vamm. Ar hontrol eo zoken. Da genta e vo atao barrekoh eged ar galleg hag a ne oar nemed e halleg. Goude, ez eus gweloh c'hoaz : ar Breizad bihan brezoneger, pa ya d'ar skol, n'e-neus poan ebed o teski ar galleg hag ar galleg a zesk neuze a vez kalz gweloh eged an hini a vije bet desket dezañ er gêr, rag hemañ ne vez peurliesia nemed eur galleg mahagnet diêz-kenañ da wellaad goude. Ar vistri-skol a oar mad pegement a boan o-dez o lakaad ar vugale da goll ar galleg mahagnet-se. Kalz nebeutoh a boan o-dez gand ar re ne ouezont nemed brezoneg.

Med ouspenn, ar brezoneger bihan, pa 'nez eun tamm spered, ne vez ket pell o tond da veza ar barreka memez war ar galleg hag an dra-mañ n'eo ket nemedken abalamour ma vez dioustu direbech e halleg, med ivez abalamour ma vez deuet e spered da zigeri buannoh dre ma vez bet dleet dezañ, en eur zeski diou yez, mond heb ehan euz an eil d'eben. Ha diwezatoh, ma teu dezañ rankoud deski eur yez all, ar zaoneg pe an almaneg, pe an diou yez zoken, e hello deski anezo kalz êsoh ha kalz buannoh, dre ma 'n-eus dija paket an tu war ar galleg.

N'eo ket bet tost dezañ koll e amzer. N'e-neus greet nemed gounid. Med ar gwella tra e-neus gounezet eo ez eo bet lakaet en e galon ar c'hoant da zerhel mad da yez e dadou-koz. Da vihanna, eñ ne deuo ket dezañ ober evel meur a hini, hanter-kant vloaz 'zo, d'ar poent ma weled ar gouarnamant o klask diskar anezañ er skol, kaoud mez oh anzav e oar ar brezoneg. Gwelet am-eus d'ar poent-ze eur vaouez a zaou-ugent vloaz, beza ma ne oa ket gouest da guzad he aksant, prest da doui ne ouie ket eur ger brezoneg. Mond a ree, pa deue d'ar gêr da weled he zud, beteg ober van da veza ankounac'haet anezañ.

Va mamm-goz, eur vaouez dispar, eun tamm rust evel ma vezed aliez gwechall, eur vaouez vad goulskoude, n'he-deze ket aon o lavared ar wirionez d'an dud. N'he-doa tamm deskadurez ebed, da vihanna tamm ebed euz an deskadurez a heller paka er skol. Diêz e vije bet dezi : ne oa bet nemed c'hweh miz war vankou ar skol. En desped d'an dra-ze e ouie lenn ha skriva a-walh a halleg evid en em denna e-touez ar Hallaoued ha zoken evid serri e veg da veur a hini ha, beza ma doa bet mizer ha poan a-leiz en he yaouankiz, he-doa gellet goude mond mad gand he hent e-touez an dud ha lakaad an oll dre ar vro da gaoud doujañs dezi.

Ar vaouez a zaou-ugent vloaz a zo deuet kont ganen diwar he fenn a oa nizez dezi. Homañ a oa, evel va mamm-goz, eur plah diwar ar mêz. Med dimezet e oa, d'he ugent vloaz, da eun den euz ar vro eet da labourad da Bariz. Ne deue ket aliez dezi na d'he gwaz d'ar gêr. Mond a reent kentoh, e-pad an hañv, da vord ar mor, evel ma oa dija ar hiz e kêr.

Eur wech goulskoude e oant deuet da di va zud. Savet e oa zoken c'hoant ganto da zond eun devez da weled o zintin va mamm-goz. Kerkent en em gavet en ti, ar Barizianez-dre-zigouez a en em laka da chaokad galleg evel ma vije bet c'hoaz e Pariz. Va mamm-goz, estonet, a zigor braz he daoulagad o klevet anezi; eun tamm droug a zav enni

zoken, rag ne blij ket dezi kleved o hallegad dirazi tud hag a oar kaozeal brezoneg pa garont. « Alato! Mari-Jan, emezi, n'eo ket posubl e vije kollet ganez da vrezoneg e Pariz! Laosk da ardou ganen-me. Kaoze brezoneg amañ. Gouzoud a rez me ne ouzon ger galleg ebed.» Ha Mari-Jan, ruz gand ar vez, a baouez da ober ardou hag a en em laka da gonta kaoziou e brezoneg gand he zintin.

Me, d'ar poent-se, n'em-oa nemed trizeg pe bevarzeg vloaz, med n'em-eus ket abaoe ankounac'haet ar gentel roet eno gand va mamm-goz. Setu em-eus dalhet bepred d'ar brezoneg ha klasket zoken e studia ken aliez ha m'am-eus gellet.

Diou wech em-eus bet tro da ober. Da genta e skolach Kastell-Pol. Eno e veze greet skol vrezoneg d'ar baotred o-deze c'hoant. Med dre ma ne veze ket a vrezoneg en egzamin ar vachelouriez, ne vezem ket niveruz o heulia ar henteliou, ha dre ma ne oa ket on mestr unan euz ar re wella ne lakaem ket d'o heulia toud an imor a vije bet dleet. Vad a-leiz o-deus bet greet din goulskoude. Atao emañ e-touez va levriou yezadur an aotrou Vallée a veze greet deom deski.

Med kaiz pelloh ha kaiz gwelloh on bet lakaet eur pennad brao goude da studia ar brezoneg, peogwir on bet lakaet d'e studia gand ar brezel diweza, e-pad ar pemp bloaz ma'z on bet prizonier en Almagh. Ya! N'eus forz pegen estonabl e hell beza, e-pad an amzer-ze!

Arabad eo goulskoude mond da zoñjal e oan bet tentet da studia ar brezoneg eno, evel meur a hini, evid ober plijadur d'an Almanted hag evel-se beza digaset d'ar gêr ganto da labourad evito. An dra-ze n'eo ket bet biskoaz em spered.

Ofiser e oan hag, evel an ofiserien all, e oen dalhet en eur hamp braz a-dreñv orjal dreineg. Eno, e-pad ar pemp pe c'hweh miz kenta, dre m'oneze netra da ober nemed kousked ha gedal an tamm boued treud a veze roet deom, ne ouezem ket petra da ober hag e kavem hir an amzer. Inouet spontuz e vezem, ken inouet a-wechou ha ma'z ee diêz on penn.

Med eun devez e teuas d'am havoud seiz pe eiz kamarad, tud a beb seurt micher, a beb seurt oad (tri pe bevar skolaer, daou pe dri ofiser a-vicher, eun ijinour pe zaou), da houlen diganen sikour anezo da zeski ar brezoneg eun tamm gwelloh. Lavared a rankan e oen estonet, gwall estonet zoken, o weled hag o kleved anezo. Biskoaz ne vije deuet din soñjal en eun dra evel hennez.

Perag e oant deuet d'am havoud evel-se? N'em-eus ket soñj ken. Ar pez am-eus soñj outañ eo e oen tentet da genta da refus. O! N'eo ket abalamour d'an diegi e oa, med abalamour ma vezem tost da grevi gand an naon. Naon on-neze euz an eil penn d'an deiz d'egile. Ken treud e veze ar boued ha ma ne chome koulz lavared nerz ebed ken ganeom. Kleñvel ha mervel a ree meur a hini ha ne veze nemed eur c'hoant : chom astennet da labaskenna war bleñch ar gwele. Med penn tud Vreiz a zo eur penn kaled ha va hamaraded a zalhas d'o goulenn. Kement ha ma oe red din plega dezo.

Med rankoud a ran ivez anzav n'em-oe ket goude a leh da gaoud keuz da veza pleget dezo. Rag goude e oe echu evidon an inouamant. Da genta ne reem nemed kaozeal brezoneg etrezom, teir pe beder gwech ar zizun. Med buan goude, lakom deg pe bemzeg devez, e oe eet ano diouz an dra-ze dre ar hamp a-bez.

Hemañ a oa eur hamp braz hag a oa ennañ seiz pe eiz mil ofiser prizonier. En o-zouez e oa war-dro pempzeg kant Breizad hag ar beurrasa anezo euz Breiz-Izel, euz bro ar brezoneg. Hag em-oe ar zouezenn da weled tri-ugent kamarad all pe ouspenn o tond da houlen diganen o leuskel da heulia ar pez a anvent dija ar skol vrezoneg.

Ne oen ket gouest muioh da refus d'ar re-ze eged d'ar re genta. Med neuze ne oe ket ken heñvel an traou. A-raog, pa ne vezem nemed seiz pe eiz, e hellem en em ober diouz eur gaozeadenn simpl etrezom. Pa oa deuet hanter-kant pe dri-ugent all (n'em-eus ket gouezet biskoaz just ped a veze) ne oem ket gouest ken da genderhel evel-se. re e oam deuet da veza hag e oe red din en em lakaad da ober kenteliou evel er skol. Ar skol vrezoneg a oa savet er hamp outi he-unan ha savet kreñv en eun taol. Ken kreñv ha ma oe staget ouz ar Skol-Veur a oa bet krouet er hamp eun tamm kentoh.

Soñjal a heller eno ar skolidi n'o-doa netra euz re skoliou Bro-Hall pe Vreiz. Ar skol-mañ e kaved enni asamblez paotred yaouank ugent vloaz, re dregont, re zaou-ugent, re a hanter-kant ha re all tost dija da dri-ugent; lod eur galoñs nemedken war o mañch, lod, an niverusa, daou, lod tri, lod pevar ha lod all zoken pemp.

Ouspenn, en on skol, beza ma oa bet staget euz ar skol-veur, den ebed ne glaske brammad uheloh eged e reor. N'on-oa c'hoant ebed da ober evel er skol-veur, na me, abalamour va deskadurez war ar brezoneg ne oa ket barreg a-walh, nag ar skolidi, abalamour ne oa e penn hini ebed anezo

ar c'hoant da baseal eun egzamin; ne glaskent nemed lakaad o amzer da dremen ha kemered eun tamm plijadur o teski pe o teski gwelloc'h ar brezoneg.

Rag e-touez ar re a ouie dija eun tamm brezoneg e oa meur a hini, seiz pe eiz, hag a ne oant ket euz Breiz; ne ouient ket zoken a-raog netra euz ar vro; ne ouient ket, dreist-oll, he-doa eur yez disheñvel ouz hini Vro-Hall.

Unan anezo a oa euz departamant an Ardenn. Ar memez oad just e-noa ganen, tri bloaz ha tregont. Ne oa ket tost dezañ beza ar henta deuet, peogwir e oa bet o studia e skol Politeknik Pariz. Unan euz ar re genta zoken e oa bet eno. Pa 'n-oa echuet e studi e oa deuet da veza ofiser aviaer. Just a-raog ar brezel, e oa dija komandant hag en eur garg uhel, rener e minister an èr. Eun den a spered dispar. E pemp pe c'hweh miz e oa deuet a-benn da zeski a-walh a vrezoneg evid beza gouest da gaozeal kenkouz hag ar gwella teodet euz paotred Leon. Med ouspenn e oa deuet da veza evidon-me eur mignon kèr.

Eur pennad brao, seiz pe eiz miz marteze, an traou ne oent ket gwall èz evidom, nag evidon-me, nag evid ar re a veze er skol ganen. N'on-oa levr ebed. Henn gouzoud a reer, heb levr ebed, n'eo ket èz labourad mad er skol.

Med goude, beb an amzer, eh en em gave eul levr bennag, yezaduriou, geriaduriou ha zoken levriou all evel *Intron Varia Garnez*, *Hervelina Ger-raouell*, *An Ti Satanazet*, *Ar Baganiz* hag all..., a-walh evid sevel eun tamm bibliotek.

Med ar skol-ze, ma deus lakaet meur a hini da zeski eun tamm brezoneg pe d'e zeski gwelloc'h, he-deus rentet din-me kalz muioc'h a zervich eged d'ar re-ze, rag lakaet he-deus ahanon da zeski kalz muioc'h egeto. Perag? Er skol, an hini a zeski ar muia a vez atao ar skolaer, da vihanna pa ra mad e labour.

Hag an dra-mañ, dre ma ne gaven ket, evel ma en em gav re aliez bre-mañ, va labour aozet din a-raog war eul levr, ne hellen konta nemed warnon va-unan. Kement tra a glasken lakaad va skolidi da zeski e ranken e denna va-unan euz ar pezh am-oa desket er gêr gand va zud ha goude e skolach Kastell-Pol, med muioc'h c'hoaz euz ar pezh a gaven o prederia war ar pezh a ouien dija.

An dra-ze hag ar fed ma veze red din klask rei da entent sklêr kement tra am-meze da gomz diwar e benn e-neus lakaet ahanon da zeski mad a-walh ar brezoneg.

Setu pa 'n-oa goulennet an Aotrou Gallo diganen kemered perz en enklask war ar brezoneg e kavas din ne oan ket re henaoueg evid henn ober.

(da veza kendalhet)

Y. Miossec.

IFIG

Albom bet savet e brezoneg

gand bugale

skol gentañ

Plonez-Kintin

(Lakaet 'z eus bet eun droidigez en esperanto)

10 lur (600g)

HEKLEO TRAON BOUZAR

X

Strobinellerez ha troiou kamm!

*Pa ziskouez ar biz al loar,
An diod a zell ouz ar biz!...*

Chin.

N'oh ket bet strobinellet tro ebed? Beb tro ma teu ho muzell da goeñvi ha da hlorodenna eun tamm bennag! An dra-ze a zo en em gavet ganeoh er pardaez goude kloh an Añjeluz, pa' z oh bet eur pennadig bennag er-mêz en noz, neketa?

Piou eo a ra an dra-ze deoh? Paotred ar Zabbad 'vel just, ma n'eo ket ar Baotred Jakez. Dreist-oll ma peus gwelet n'eo ket eun OVN, med goulou red pe eul lutig all bennag evel-se o treuzi ar prajou pe ar foenneier dreist-oll. Evel pa'z it da gerhad dour d'ar feunteun. N'eo ket fall kennebeud kas ganeoh eur hef tan hag e drempa en dour! Kement-se a hell o zehad! Komprenit!

N'ho-peus ket klevet anezo o vouskana en avel-noz pa gouez an deliou, ar gorriked, paotred an noz hag a za buan da guzad diouzh dindan ar pontig e penn an hent! Kana a reont a-wechou kazimant frêz : - « Di-lun, dimeurz, dimerher, diziou, dirgwener... Gwalarn pe reter?... »

Neuze avad a-benn fin ar zizun n'oa ket ral gwechall kleved òa paseet adarre Karr an Ankou, ma n'oa ket eun tu oa en tu all! Hag arabad deoh

soñjal ez eus atao gantañ gwigour, storlok pe strakadennou evel ma lavar lod!... Eo! Eo!...

Sellit n'eus ket pell c'hoaz kement-se : da beder eur vintin oa dihunet ar Pont-Prennig gand strakou tachou boutou-koad unan bennag o pignad a-dreuz ar porz. Mond a reas d'ar prenestr er zolier, setu ma welas oa Yvon Gabalan! - « Med da beleh ez ez evel-se d'an eur-mañ? » a houlenas ar miliner digand e amezog. Hemañ a jomas a-zav, sebezet. A-benn eur pennad, ar miliner a reas adarre e houlen. Hag egile : - « Me? Me na ouezan ket ! » emezañ. - « Nann! Ne ouezan ket...! »

Daoust hag ar paotr n'oa ket bet c'hoariet gand ar Baotred Jakez? O veilla eun tremenet oa bet Yvon e-doug an noz, war-dro Kampir. Ha da deir eur hanter vintin e soñjas mond d'ar gêr da ober eur mored, eur berad kousked! Mez en eur vale, o vond d'ar gêr, setu ma kouskas mad ar paotr en e zav evel-se, hag a 'z eas d'he-biou d'e gêr heb tarda. Hag eet e vije ivez pelloh eged Pont-Prenn anez ar miliner.

N'ouzon ket piou ken e-touez on tud-koz euz ar barrez a oa bet tapet ivez ganto. Bet o varvaillad en eun tiegez diwar-dro, goude koan. Evid mond dillo goude-ze ez eas a-dreuz an douarou d'ar gêr. Med en eur waremm, setu ma chomas heb kaoud e hent : ober a reas an dro eur wech, diou, teir..., netra da ober evid kaoud nag ode na zoken an disterra ribin.

A-barz ar fin e klaskas mond a-dreuz keuneud ar hae...hag e kouezas war e benn en... eur strêd zon! Eno eo e oe kavet antronoz vintin gwall hlozet en e benn. Va zad-koz Penn-ar-Prad, « Gastou a lavaran », emezañ. Eñ a hoarvezas ivez gantañ ar memez istor o tond d'ar gêr en noz du diouz Ker-ar-beleg pe Gerviou. Med finnoh oa bet, ne weloh ket, evid en em zistroba... a-benn teir pe beder zro d'ar waremm! Tarda a reas evid soñjal. Hag ivez e cheñchas, emezañ, tu d'e voned war e benn : e lakaad a reas war e du eneb!

Ha dioustu kerkent e kavas an hent d'ar gêr. Mad oa, emezañ, da houzoud. Med piou en-dije soñjet, kea!

E Keroel eo e veze aozet louzou ar Sko gand nao seurt traou hervez lavarou ar re goz : eul louzou da barea tud ha chatal, dreist-oll ma'z oa bet ar goulou red war o lerh ha paket ganto neuze êz a-walh liou ar foerell. Den ne oar ken ober hirio ar vedisinerez-se, anad deoh. E Pont-Prenn zoken e oa bet eur vuredad louzou ar Sko en ti, an amzer Fañch

an Aotrou, a hoarze ar pez ma helle gand e istor.

Dor an ti war an a-dreñv kein a storloke beb noz, beb noz hag a zihune ar verh Nonnon en he gwele kloz. Ar verh a zoñjas oa al louzou Sko, an tamm louzou an diaoul-ze eo a ree ma teue beb noz, it da weled, eur horig bennag marteze evel-se da heja an nor. Skuill a reas eta ar vuredad-ze er-mêz, ha peoh! An nor, selaouit, an nor ne storlokas ket ken! Rag Fañch, en dervez-se, a stardas... morailh an nor...

E Koatoroh, bemdez e teue eun dervecher abred-abred, hañv-hoañv... Setu ar mestr-mevel a gavas oa re an dra-ze : lakaad beb mintin da eun eur dizonest oll dud an tiegez war-zaol! Kenta labour an dervecher oa digas ar behiou foenn d'ar zaout diouz penn ar bern, euz penn all al leur.

Ar mestr-mevel a lakaas en e benn dizon al leue zod-se! Mond a reas da hedat an dervecher e penn ar bern foenn, kuzet a-dreñv ar behiou. Pa deuas egile, e tapas dezañ goustadig en traoñ d'e zivesker gand... e zaouarn yen ha glepet..., hag en em zispaka. Egile a oa bet spontet net! Hag en em fourras er hraou zaout...heb bouj ken!

Eur pennad goude e oe kavet eno o krena c'hoaz evel eur bern deliou seh, dre ma oa bet, emezañ, krabanatet gand ar Baotred Zabbad. Ar mestr-mevel da zijuni a lavaras dezañ : - « Marteze ne blij ket re d'ar re-mañ gweled an dud o sevel re abred. An deiz zo greet da labourad, gwir eo! Med ivez an noz da gousked... ha war ar marhad d'ar gorriked mond gand o henchou treuz...!» An dervecher a oa bremañ rezonabl. Hag ez ee hiviziken da benn ar berniou kolo gand eur forh. Ne ouezer ket jamez!

Tonton Herve, marichal Toullan, a oa ivez kanaill a-walh gand e istoriou. Hemañ oa breur yaouanka Nonnon a Bont-Prenn. Unan bennag a gontas din war-dro va zri-pevar bloaz. Me a oa war e skoaziou o tond diouz santier an ti nevez e Traoñ Bouzar d'ar zerr-noz dre ravanou ar Park Lakoun. Ha me a skrije gand aon na vije ket c'hoaz uhel a-walh va zreid diouz an douar : ma teuje eul louarn rouz bennag da lipad din va zreid? Pe c'hoaz eur pemoh gouez hirroh c'hoaz e voustachou eged e zent kom? Brasoh kalz e chomen aonig a-walh en noz : ma vije aze al louarn rouz a-dreñv kein eur wezenn goz..., pe, it da weled petra! Gwez koz traoñ ar Bourk dreist-oll, n'eus ket ken hirio. Atao en hañv e veze kroaz gand ar raned aze... dindanno! Ha me a file, me lavar deoh, heb goulenn va rest!

Eun abadenn all oa zoken evidon, hag evel just evid va hoarezed beb tro ma teue va zro da vond dre ar porz teñval da gas e goan d'ar hi. Eun askell grohenn en noz n'oa ket kalz a dra. Med ar gaouenn hag ar haz-noz a oa lakepoded all ha n'am-boa tamm fiziañs ebed enno. En Enez Rouz e oa beb noz eun daou pe dri war-dro ar chimilarou : unan o hou-lenn a « hou - out » a-hed an noz. Hag egile oh ober « Houin-ho! Houin-ho!» a-greiz pep kreiz da zurpren ahanoh, goude beza lonket eul logodenn bennag. Eur Yann all, paotr fin goulskoude, a gave dezañ beza bet strobinellet : nehet-net, ar paotr a 'z eas zoken da gaoud ar medisín. Soñjit 'ta! D'al lun vintin e oe ken souezet e benn pa'z eas, respet deoh, da ober e staotadenn genta! Staoted glaz a ree, ken glaz hag eur boned martolod! Va zudou keiz, biskoaz kemend-all! Marteze, emezañ outañ e-unan, an dra-mañ a baseo. Med beb tro ma'z ee... da drei e fri en eur horn-tro bennag, beb tro, a-hed an dervez... oa atao glaz burzuduz ar stal! Hop! hop! hop! eme ar paotr. Deom da ziskouez an dra-ze d'ar medisín. Hemañ ne anaie ket ar hleñved nevez-se. Beteg ma oe kavet e tlee beza « glaz Méthylène » en-doa evet or paotr fin en e vanneaou gwin en dervez a-raog gand eur Yann all a ouie ober troiou kaer.

Or hlañvoud a douas en em veñji. Hag henn ober a reas. Paotr an troiou kaer a oa eur chaseour dister. Setu ma oe fardet dezañ eur had. Krohenn gad bourret gand kolo lakeet dezañ en « he ched », war eun torr-kae. Goude-ze e oe galvet da zond da « denna ar had », paz a re dost evel just, dre aon da ober dezi tehed kuit. Ar paotr a dennas. Ar had ne voujas ket! -« Allé! Paotr! Lazet eo! Kê d'he herhad!» Ha c'hoarz dezañ e-kreiz e henou!

Paotred an Arvor a veze ganto a-wechou kaoz war ar hoad peñse deuet gand ar wall-amzer vor war drêz aochou Lambaol. Eur bloaz e teuas pakadou braz d'an aod, gwriet e liñseriou gwano, hag e-barz marhadourez dem-heñvel ouz butun draillet fin. An dud a glaskas petra ober ganto. A-barz ar fin e oant bet taolet dindan ar zaout da houzelia. C'hwez vad kenañ er hraou bremañ! An dra-mañ a oa eul lestrad te ha ne erruas morse dindan fri ar Zaozon.

Difenn a oa da zelher ganeoh ar « peñse » en-doa c'hoaz eun dalvoudegez bennag. Peb tra kavet war drêz an Aod a oa da gas d'ar maltouter, dreist-oll ar barrikennadou a beb seurt. 'Vel just, e poanied da guzad eun dra bennag a-raog kas ar rest d'ar valtouterien. Med a-wechou ar re-mañ a deue da fourra o fri en tiez. Hag eun dro bennag e kavjont en o hrevier, oll moh an tiegez, mezo dall-pud, an hig warno, o fenn war e gostez, o veurgudi a-hed eursa dervez en o buhez! Eur zaillad pe ziou pe deir...

leun a « Vadère »... a oa eet e laouiri ar re-mañ kentoh eged e goll gand ar maltouter.

Gwechall al listri, kalz listri o tremen en uhel-vor dirag on aochou, a oa enebourien, dreist-oll pa oa brezel gand ar Zaozon. Setu neuze e reed peb tra evid digas anezo, al listri-ze, da beñsea war ar herreg. Hirio e chom c'hoaz eun tamm bennag euz youl ar peñseer gwechall e gwad o bugale vihan-you!

Rei a rankan deoh eun istor peñseerien dastumet gand Jakez an Ti Braz. Bez' ez eo Istor an Diaoul en Aod. En abardaez-se, Yann a oa eet abred d'e wele-kloz rag an amzer a oa skrijuz. Er-mêz, an avel a zourre dre ar gwez uhel hag ar haëou lann, hag a storloke an nor war o zi. Hag aze tostig d'o lokenn ti-soul, ar mor fuloret a groze spontuz evel pa vije erruet fin ar bed, pe dost.

— « An Diaoul, eme Yann d'e wreg, a zo hirio emichañs o reded dre an Aod! » Mez Marjann ne lare grig ebed. O peurachui gwalhi ar skudellou edo, hag hast warni me lavar deoh. — « Petra eo an dra-ze, skudellou!!!? » — « Mad! Gwechall ar zoubenn, al lêz, ar hafe d'ar bloaz nevez a veze servichet atao e skudellou. O pebez bigoudiad a reen gwechall pa hellen kaoud eur skudellad soubenn ar brignon, barr a gaol da va dijuni! » E skudellou eta e veze lakeet ar boued. Hag e meur a gorm euz or bro, n'eo ket skudellou pri eo a oa, mez skudellou koad. Marteze ho-peus klevet ano diouz Son ar Skudeller koad?

Mad! Marjann a oa hast warni ma'z oa eur farsite, o peurwalhi listri pe skudellou koan. N'he-doa ket a amzer da respont Yann en e wele. Me, avad, ne anavezan ket kalz ar merhed. War a gonter, lod anezo a vez aliez o imor a-dreuz. Ha goude kaozeal pase brao outo, ne respontont ket, pe hepken dre fae! Ha n'eo ket merhed dizek eo a gustum ourzal evel-se! Nann, merhed, mar plij, savet er skoliou ha desket braoig, fidandounn. E-touez ar merhed lorhuz eo e kavoh dreist-oll ar merhed pennog hag ar merhed mouzuz. O! Ar baotred n'int ket atao kalz terruploh!

En abardaez-mañ goulskoude, ne oa ket al lorh, nag an imor fall eo a vire ouz Marjan rei respont da Yann. Kalz traou all a oa war he spered! O klevet an avel o sourral e foñs ar chimilar hag er-mêz, ar gurun o krozal tamm pe damm, e soñj enni heh-unan : « An noz-mañ avad a vezo euz ar re wella evid mond da weled ha dond a rey eun dra bennag gand ar mor war drêz an Aod. Eun nozvez vad ivez evid di-yalha piou bennag a vefe diwezad o tond d'ar gêr diouz foar Lokourman. » Rag evel-se, Marjan he-doa meur a vicher!

Ped gwech, goude ma veze eet he gwaz d'o gwele kloz, ne oa ket eet-hi d'an aod, dreist-oll pa veze fall an amzer evel en noz-mañ, he hrog bizin ganti war he skoaz. Ped gwech ivez n'oa ket deuet d'ar gêr skuiz-marro, trempet evel bara soubenn ha skiaset he izili, ha c'hoaz goulskoude netra d'he heul! Mez a-wechou evelato an dro a veze drusoh. Kreñv oa evel eul loan, dispont evel eur martolod preizer, en he zav war eur garreg en avel, pe o vond hag o tond war an trêz, a-wechou don en dour mor, Marjan a furche ar gwagennou gand he daoulagad lemm. Ha kerkent ha ma wele peñse o tond gand ar mor, ez ee dineh d'e baka.

Tammou koad hir ha teo a oa bet deuet ganti evel-se war ar seh. Evel a zo bet deuet war aod Kern ar Gazell n'eus ket keid-se c'hoaz. Eur goañvez zoken e kavas peadra da goata eur hraou nevez d'an diou veoh. Eur wech all eh erruas evel-se war eur varrikennad gwin Bourdel. Hag heb sikour ebed eo e tigasas anezi a-ruillou d'ar gêr. Marjan evelato he-doa ruillet ivez en derveziou war-lerh!

Mez Yann a oa diêz e benn gand troiou kamm e hini-goz, a oa atao e vuia-karet kement hag an dervez kenta euz o eured! Kaoud a ree dezañ goulskoude n'oa ket eur gwall dra laerez ar mor. Mez Marjan a ree gwasoh douetuz braz. Eur wech e oa deuet ganti arhant hag aour! Droug ennañ ken a grene, Yann en-doa neuze lavaret dezi : « Euz pe leh an diaoul eo deuet an arhant-se ganez, Marjan? » Ha Marjan he-doa respontet ken sioulig ha tra : « Kavet en aod, va Yann! Ha kollet sur a-walh e-doug an hañv e-touez an trêz gand touristed... » Yann ne gredas ket lavared muioh en taol-ze, mez soñjal a reas : « Kavet? Ya! Pe gentoh laeret en tu bennag! » Hag e skrabe e benn gand e zaou zorn asamblez en eur lavared dezañ e-unan gand herr : « Me a denno ar pleg fall-ze diouz va Mari Goz... »

Greet en-doa a beb seurt evid klask dizona e wreg diouz an aod en noz : lubanerez, spontaillo, gourdrouzou. Mez n'oa ket tamm ebed avañ-setoh. Marjan a beñsee atao hag a laere ivez pa helle. Eur vintinvez e oe kavet eur maltouter beuzet ha digaset gand ar mor war an trêz. An archerien a deuas hag a lavaras : « En em veuzi en-deus greet! » Mez tro-war-dro, e lavared daoust ha krog bizin Marjan n'en-doa ket greet an taol da hennez? » Ha Yann a lavare atao outañ e-unan : « Me a denno ar pleg fall-ze anezi goulskoude! »

Med Marjan a gendalhe da vond d'an aod, en noz du pa blijte ganti. O! Plega ar merhed n'eo ket eun dra ken êz-se! D'ar mare-ze adarre Yann

a wele e oa eur zoñj fall bennag adarre e penn e wreg. Echu al labour ganti, Marjan a yee bremañ gand herr etrezeg an nor. — « Da beleh emadout o vond adarre? » eme Yann ha gand imor ivez. — « D'al leh ma karan! » emezi. — « Me a welo! » — « Te a welo petra? Daoust ha red eo din-me mond ken abred ha te d'am gwele? Kousk aze! Tomm atao ar gwele! Ha ro peoh din-me! » — « Marjan! Krak ha berr! Me fell din e chomfes fenoz er gêr! » — « A! A! A! Kleo 'ta Yann oh ober eur brezegenn euz e wele! An hini zo eet d'e hlud a zo pedet da jom mud! » emezi en he goap, o tigeri an nor.

An avel a hweze gwasoh-gwaz, ken e strinke ar sklent diouz toennou an amezog. Ha sur a-walh o herniel diouz ejenned Kerne evel ma leverer. — « Marjan, pa lavaran dit, an Diaoul a zo dijadennet, hag a zo o reded ar mêziou hag an tevenniou! » — « Me ne ran forz ebed euz an diaoul! » eme ar wreg dispont. — « Diwall na errufe ganez, panezenn! » a lavaras c'hoaz ar paotr Yann p'edo Marjan o rampad dreist an treujoù... er-mêz.

An noz a oa teñval zah. Ar goabrennou a rede taer war-zu Menez Are daoust ma ne weled ket anezo, poulzet gand avel kriz Landeda ha Sant Pabu. Marjan a skrijas pa en em gavas er-mêz, daoust ma ne skoe re ar glao neuze. Meur a wech oa bet dre amzeriou chavach en aod ha war an henchou. Mez morse evelato dindan eur seurt barr-amzer! Evid ar wech kenta eo e santas eun nebeudig he izili o krena, nann gand ar yenienn, mez gand eun tamm enkrez.

Med buan an tamm enkrez a roe e blas d'al levenez. Hag e lavare outi heh-unan en eur vousec'hoarzin : « Eun amzer gaer dispar evid ober peñse! A-dra-zur ouspenn eul lestr a vezo bannet war ar herreg er mor gand an avel foll-mañ! » Ken teñval oa ma'z eas a-benn-herr war eur mên ha ma chomas zoken a-haoliad warnañ, eun tachad amzer. Dirusklet oa eun nebeud penn he glin. Mez ne zante nemeur he foan gand ar mall he-doa da en em gaoud en aod.

Kerkent ha ma oa eet Marjan er-mêz diouz an ti, Yann a zavas dילו diouz e wele. Ar wazed n'int ket lezireg atao da zavel diouz o gwele ha pa ve da vond d'an oferenn vintin! Yann eta a zavas prim diouz e wele, eur mousc'hoarz ivez e korn e vuzellou : — « Me a gaso ar gizioù fall-ze diouti goulskoude! Evel m'am-eus dizonet meur a onner laer beteg-henn! » Buan en em wiskas. Lakaad a reas zoken e viz e piñsin an dour benniget. Anad deoh ne oa netra ennañ avad euz c'hweze an dour benniget abaoe pell amzer. Lakaad a reas e viz er piñsin, ober a reas sin ar groaz. Ha oa eet d'an daoullamm ruz war-zu an aod ivez a-dreuz ar parkeier, an

tevenniou, dreist ar haou evid mond buannah, e riskl zoken da derri e zivesker. Marjan n'edo ket c'hoaz ouspenn he hanter-hent pa erruas Yann war an trêz ribl ar mor.

Raktal e hourvezas eno e stok e gorv, e fri don en trêz. Eur wech an amzer e save e benn da weled ha ne oa ket erru c'hoaz an « dintin Fardao » A-benn deg munut e klevas eun dra bennag o sourral. — « Kleo! eme Yann, lostenn va gwreg o nijal gand ar gorventenn! Ema-hi tost din! » Neuze avad e reas evid mad ar maro bihan. Ne grede ket zoken tenna e alan nemed dre e fri!

Marjan oa e gwirionez a deue etrezeg ennañ. Selled a ree endro dezi, furchad a ree gand he hrog e-touez ar herreg evid klask peñse : barri-kennou, tammou koad pe traou all, peb tra a oa mad eviti. Gweled a reas eun dra du bennag astennet war an trêz. Buan e tostaas outañ. Pa stouas e welas e oa eur horv ledan ha hir : — « Sell, emezi, unan beuzet bennag. N'eo ket fall e zillad! Mez tennom da genta e jupenn digantañ, ha gweleom hag arhant a zo en e hodellou. » Mez e-pad ma tiskrave Marjan diouz he hrog-tri-biz, an « hini maro » a zav trumm en e zav!

Tapoud a reas Marjan a-bouez he bleo, foultri a ra anezi war an trêz, ha rei a ra dezi eur roustad evel n'en-doa a-viskoaz greet c'hoaz! Marjan a grie hag a youhe : — « Va buhez! Va buhez! » Mez an hini maro a gendalhe da skei ha gwasoh gwaz. Pa gavas dezañ en-doa roet louzou a-walh dezi evid he farea diouz he rederez noz hag he laeroñsiou, Yann a flipas kuit. Ha d'ar gêr buanna ma helle mond adarre : en eul lamm all oa divragezet, ha klog en e wele.

Marjan gêz, goude beza kunudet eun tachad mad war an trêz, a hellas oh en em harpa war he hrog, mond a-ruzou d'ar gêr. Ken korbezenn ha ki Noun an Enez Rouz, al Labichon Goz, da fin eun dervez chase, he dent o strakal hag he dremm ken gwenn hag eul liñser! Yann a rohe en e wele kement hag eur gegin goz pa glevas Marjan o sevel war ar houfr da lavared eun tamm pedenn. Rag bremañ e teue dezi eun tamm soñj an Aotrou Doue.

Pa glevas trouz eta gand Marjan, Yann a reas an neuz da veza o tihuna, en eur frota spontuz e zaoulagad, e lavaras ken brao ha tra : — « Ahanta, Marjan! Petra 'peus kavet 'ta hirio? » — « Netra 'n oll, Yann! Netra! Mez an Diaoul a zo erruet ganen! » — « An Diaoul?... Alato! Lavaret 'm-oa dit edo sur a-walh o reded an aochou en noz-mañ! Ne zoñje ket din e-pije afer gantañ dioustu. Ha petra 'n-deus lavaret dit? »

— « O! N'en-deus lavaret grig ebed! Mez skei en-deus greet avad! Kement hag eun torrér mein! Eur roustad en-deus roet din kenañ ken...! Ken am-mez poan spontuz en va oll izili! Kaoud a ree din ivez ne oa mui blevenn ebed war va fenn! O! Pebez loan kriz eo an Diaoul! A nann! Ne garfen ket beza gwreg d'ar bazater-ze avad! Te, Yann, a vez paotr a-walh a-wechou ivez! Mez te a zo eun doue e skoaz an aneval-ze!»

— « Setu aze, Marjan gêz, petra e-peus paket oh ober da benn fall! Mar karjes beza sentet ouzin! An Diaoul n'en-dije ket bet a grog ennout! N'em-
oa ket lavaret dit arabad fiñval diouz ar gêr en noz-mañ? Mez pa vezez en da imor fall, eun onner e gwent taro..., ne rez van ebed evid va hlevet!»

— « Mad! Yann! eme Varjan en eur grena c'hoaz. Henn toui a ran dit bre-mañ. Ne lakein biken mui va zreid en aod goude kuz-heol!» — « Mad eo!» eme Yann, en eur lakaad bremañ e benn dindan al liñser. Hag o lavared goustadig outañ e-unan : — « Ema-hi dizonet ganen, va onner vriz, diouz he c'hoant galoupad noz!»

(Da veza kendalhet)

L Conq

Gerioù:

groaz pe groaz : eo marvailhou ar raned en toullou-pri d'an abardaez-noz, dreist-oll pa vez pounner an amzer.

ober eur bigoudiad : a oa ober gand kalz plijadur eur hovad mad.

ourzal : a zo ober an ourz, chom mud, ober penn da unan bennag en eur ziskouez imor fall.

amzer chavach : gwasoh eged gwall-amzer hoaz : eun amzer da ziwall lakaad e fri er-mêz, evel just.

amzer chacach : gwasoh eged gwall-amzer hoaz : eun amzer da ziwall lakaad e fri er-mêz, evel just.

Eun Dintin Fardao : a hell beza fardet, mez kalz re, hag a-dreuz. Eun « dintin » amarret fall, ha sod war ar marhad.

diskrava : a zo diskregi gand herr ha gand mall er memez amzer.

Penaoz e troio an traou en enez-Kors?

Euz ar Hors ez eus bet komzet e-leiz e-pad an hañv tremenet. E Breiz amañ koulskoude n'anavezom ket mad an enezenn-ze hag a zo 220 000 bennag a dud o chom enni, war-dro eun hanter anezo o komz ar horseg. Penaoz eo gouest an traou da droi eno diwar-vremañ? Digand eur Horsad on-eus goulennet displega e-unan penaoz e wel anezo. Gwelet e vo en e bennad eo disheñvel e brederioù diouz ar re-ni war veur a boent, med ez int heñvel e kalz keñverioù all.

Brud Nevez.

E-kerz an hañv 82 nevez-echu, eme Pobl ar Hors o paouez ober eur hammed evel n'he-doa biskoaz bet an dro d'ober a-hed heh istor hir ha truezuz. Da genta, evid tenna o lañs digand ar vroadelourien, e-neus ar Stad Hall kinniget dezi eur statud (hag a zo bet skarzet dioutañ a-dra-zur ar pezh a oa ennañ er penn kenta), med dreizañ eme evid ar wech kenta abaoe ma'z eo bet staget ouz ar Frañs, o paouez envel eur Huzul-Rannvro, hervez an dregantad a vouezioù.

D'an eil, an devez just a-raog ma'z eo bet anvet Prezidant ar Huzul gand eun drederenn euz ar 61 huzulier (da lavared eo gand eur hard deuz an 200 000 voter), an F.L.N.C. (Talbenn Dieubidigez Broadel ar Hors) — hag a oa bet galvet gantañ an elektourien da jom er gêr — e-neus kinniget deom eur « super nozvez hiaz » o lakaad muioh evid 100 bombezenn da darza en enezenn a-bez. Evel-se, eh echue an F.L.N.C. gand an ehan a oa bet digemeret abaoe miz mae 1981 (da heul ar votadeg evid dibab an deputeed), abalamour ma ne anzav ket Stad Vro-Hall, emezañ, gwirioù broadel Pobl ar Hors. Soñjal a heller eta e vo c'hoaz nozvezioù trouzuz en enez.

Ken stenn ha m'ema an traou, ne weler ket petra vo gouest d'ober Kuzul ar Hors, na war an dachenn bolitikel, na war an dachenn zevenadurel, ha n'heller ket distaga an eil diouz eben.

Taolenn ar pezh a zo bet greet war dachenn ar zevenadur abaoe 10 vloaz :

Red eo bet ren eur stourm hir ha kaled, dreist-oll a-berz an emgleo **Scola Corsa** a zo bet savet hag a zo renet gand an hini a skriv al linennou-mañ, evid ma vije sinet gand Stad Vro-Hall (an ao. Fontanet o veza Ministr an Deskadurez) eun dekred da lakaad al lezenn Deixonne da dalvezoud er vro ma vez komzet korseg, kement-mañ a-benn arnodenn ar vachelouriez ar memez bloavez.

Red eo bet d'an emzao sevenadurel ha politikel ren eur stourm hir a-benn ma vije addigoret skol-veur Corte, e 1981. E 1769 e oa bet serret p'he-doa ar Hors, trehet gand an armou, kollet he dieubidigez.

Abaoe m'eo bet lakeet al lezenn Deixonne da dalvezoud, n'he-deus ket kelennadurez ar horseg ar peadra red da vond war-raog, ha ne vez ket roet muioh evid dindan Giscard pe Pompidou evid yezou ha sevenadurioù « ar rannvroioù » gand keilhaer ar Ministr socialist a viz even 1982.

Danvez lezenn ar Peñseg, an Ofis Sevenadurel, hag all...

En em houlenñ a heller hag e tiwano tra pe dra diwar danvez-lezenn niv. 2229 an ao. Peñseg, ha daoust ha ne vo ket taolet d'ar blotou Ofis Sevenadurel ar Hors a oa sañset da veza goulennet e ali digantañ evid pezh a zell ar yez hag ar zevenadur e Kors.

A-dra-zur, abaoe 2 vloaz ema war an dachenn ar 6 kelenner korseg a ya a skol da skol. 50% deuz ar re a vez o tremen ar bac. en enez, da lavared eo 600 diwar 1250, a vez dibabet ganto an opsiou gorseg, evel a vez greet ivez gand 300 all e Bro-Bariz hag er Provañs. A-dra-zur, e vez renket stajou berr evid ar gelennerien gorseg en enez, med ne vez ket greet evid ar re a gelenn e Marseill, Nice pe Bariz.

Kreizenna e Kors hag unvani ar skritur :

Ema ar C.R.D.P. o vond d'embann eun 20 bennag a leoriou-skol da gelenn ar horseg, ha kinniget e vo eur skwerenn en oll skolioù. Med nahet e-neus beteg-vremañ Prezidant ar Gomision anvet gand ar Rektor da daoler eur zell war al leoriou skrivet e rannyez ar hreisteiz (rannyez Sartene.)

Kelennadurez ar horseg dre ar horseg :

N'eus bet greet nemed nebeud a daolioù-èsê a gelennadurez dre ar horseg. En tri-hard euz ar skolioù, e vez kelennet ar yez da euriou disheñvel-tre, hag e Skol-veur Corte ema peb tra da veza renket er heñver-ze.

Ar skolioù-mamm e korseg :

Abaoe 5 bloaz, ez eus 3 skol-vamm e korseg, hag a zo bet lakeet e plas gand

ar strollad **Cultura di Lingua Corsa**, hag e-neus digemeret ar memez reoliennou ha Diwan e Breiz, an Ikastoliek en Euskadi, ar Bressola e Katalogn hag ar Calendretta en Oksitani.

Ar radio hag an tele « euz ar rannvro », sañset :

Er radio « euz ar rannvro » sañset, e vez skignet abadennoù gand FR3 Kors euz 7 eur ha kard da 8 eur, hag euz kreisteiz da greisteiz hanter, med nah a ra rei keleier e korseg. Evid an tele, e vez savet abadennoù e korseg a 12 pe 15 munut ar zizun, hag a vez adskignet da euriou disheñvel war an teir chadenn, med tennet e vezont kuit e-pad an hañv.

Ema ar servij o paouez beza adrenket ha digreizennet. Adaleg miz gwengolo 1982, ne ray an hini a zo bremañ e karg, an ao. Sanguinetti, nemed war-dro an abadennoù tele en Ajaccio, ha nevez anvet eo bet an ao. Eyssartel gand Pariz evid ober war-dro an abadennoù radio hag a vo skignet, a-hervez, eun deg eurvez anezo bemdez e korseg (?)

Notenni a vo greet ez eus eur post prevez (R.C.I., Radio-Corse International) hag a vez klevet e-pad an deiz war M.F. (91 ha 95 mhz), euz Bastia, gand eur stign en Enez-Elbe, hag a vez e korseg evid eul lod braz.

An diouyezegez trompluz :

Darn euz ar re a zo a-du gand an emrenez a-ziabarz ha zoken lod euz ar re hag a zo sañset broadelourien, oh ankounac'haad eo ar horseg yez vroadel nemeti ar Gorseg, a vez kinniget ganto an diouyezegez evel ar remed a hell miroud ouz ar horseg da veza lazet espres-kaer. Kinnig an diouyezegez er stad m'ema sistem an deskadurez er poent-mañ a zo rei c'hoaz muioh a chañs ha muioh a beadra d'ar galleg da boueza war ar horseg hag e-neus dilañs diwarnañ. Ar pezh a ranker kaoud, d'or zoñj, eo eur sistem all a zeskadurez hag a lakfe e plas tamm ha tamm skolioù-mamm e korseg, hag a zalfhe da houde er henta derez. Da houde eo e teuy ar galleg.

Ar c'hoariva, ar han, ar sinema :

Bez' ez eus strolladoù kanerien, c'hoariva, ha sinema e korseg, hag a ra kalz traou en enez hag e-touez Korsed an diavêz. N'e-neus ar horseg kazi tamm plas ebed e Ti Sevenadur ar Hors hag e skol-veur yaouank Corte, abalamour ma n'eus ket tu en doare ma'z int frammet.

Tud ha peadra :

Evel-se, er mare-mañ euz istor on enezenn, e heller gweled an traou e du hag e gwenn war eun dro. D'or zoñj, ne hello Kuzul ar Hors ober seurt ebed evid ar yez hag ar zevenadur, en eur zehel kont euz an oll disheñvelderioù. E plas ar

greizennerez hall, e vo eur greizennerez kors, da veza efedusoh sañset. Ar galloud politikel a vez anvet gantañ, ne oar den euz a be leh, tud e karg war dachenn ar zevenadur hag o-deus c'hoant da lakaad ar strolladoug hag ar stourm sevenadurel diouz o zu. N'eus bet nemed 2 pe 3 euz ar re a oa war ar renk a-benn ar votadeg oh ober gand ar horseg evid o bruderez, pa oa anavezet gand ar beurrasa. Ar re hag a zo broadelourien sañset a vez kinniget ganto an diouyezegez, o lakaad evel-se ar stourmerien a fell dezo sevel skoliou-mamm e korseg da goll nerz. Ar C.R.D.P. a fell dezañ lakaad ahanom da zigemer dre red skritur doare-korz an hanternoz, o laza evel-se spered-imbroudi rannyezou ar hreisteiz. Skol-Veur ar Hors a zo ar skol-veur hall e Kors evid skigna ar galleg hag ar zevenadur gall. Heñvel evid ar radio hag an tele hag a zo sañset « euz ar rannvro »... Peadra da weled an traou e du. Med...

Peadra a zo da gaoud fiziñs :

Dihun an emskiant broadel kors e-touez ar re yaouank eo a ro peadra da gaoud fiziñs daoust deom da houzañv abaoe 200 vloaz an diberhenna a-berz ar zevenadur galleg e Kors. Evel-se, e weler sklêrroh-skiërta peseurt roll er penn a-raog a hell beza hini Skol-Veur Corte, a-drugarez d'ar stourm renet gand ar studierien ha n'int enskrivet nemed er C.S.C. (Consulta di studenti corsi), troet da veza broadelour. Strolladoug c'hoariva, kan ha sinema a vez klasket ganto adkaoud eur zevenadur kors a-orin. Muioh-mui a Gorsez yaouank a vez nahet ganto kuitaad o douar, hag a glask adkaoud doare-beva o fobl, hag o yez hag o zevenadur 'barz ar gont-se.

A-dra-zur n'eo nemed tamm ha tamm hepken e hello an traou-ze dond da wir war dachenn ar zevenadur, ha da heul eur stourm pemdezieg. Trei a ray ivez an traou hervez ar pez a hoarvezo war dachenn an ekonomiezh hag hervez ar stourm politikel a lako fin d'an divroa.

Trei a ray c'hoaz an traou hervez ma vo kont war dachenn ar bolitikerezh er vro C'hwehkom, diouz ma roio Pariz eur wir gontrad hag a zavo an droed he-deus pobl ar Hors da zibab he-unan he flanedenn.

Berr ha berr, war dachenn ar zevenadur e c'hoarvezo ar pez a fello deom. N'eus netra hreet, n'eus netra gollet c'hoaz. War-lerh ar mare m'e-neus Stad Vro-Hall diskouezet he nerz war dachenn ar zevenadur, hag ar mare ma tiskouez bremañ an F.L.N.C. e nerz a-eneb, en em gavo eur marevez a renevezadur sevenadurel kors. Savet e vo da heul stourm an dieubidigez vroadel e Kors.

J.B. Stromboni.

Prezidant an emgleo **Scola Corsa** e Corte.

Troet gand Skipaill **Brud Nevez**.

Petra vo roet gand Savary?

Mond war-raog...

pe Mond war-gil...

Klemmou e-leiz a zo bet savet hag a zalh da zevel ouz kemmenadenn **Alan Savary** diwar-benn kelenn ar yezou-« rannvro », diwar-benn ar helenn brezoneg eta. Eur gemennadenn bet diskleriet da genta gand ar ministr d'ar gelaouennerien (ha divennet da zekretour **D.P.L.F.** beza eno, neuze!), hag embannet da houde tra ken d'ar 1a a viz gouere...

Pa deuas skrid ar helhlizer er-mêz, anad a oe d'an oll ne oa ennañ netra resiz o rei da houd penaoz e vo sevenet ar bromesa stard, ar « **ouestladenn a-berz-Stad** » a lakafe da dalvoud ar « **statud gwirion** »-ze a gaver meneget e penn kent a ar « **plañ tri bloaz** » displeget, sañset, gand Savary... Netra resiz, a lavarom, na krouidigez eun niver bennag a bostou skolêrien ha kelennerien, na yalhad ebed merket da helloud lakaad kelenn yezou Bro-Frañs da vond endro!

Netra resiz... nemed eun toullad reolennou **o kas war-d.eñv** : e-barz ar skolachou, ne vo aotreet nemed **eun eu-veziad beb sizun** evid studi yez ar vro er 6ved hag er 5ved klas, — pa ne oa koulskoude merket netra seurt-se evid an amzer da implij, beteg-henn, ha pa helled implij diou eurvez, da skwer... A-hend-all, red e vo **kaoud 15 skoliad da nebeuta** a-benn kelenn

ar yez e klas-pe-glas, pa ne veze niver bihanna, minimum ebed, kent bremañ. Ouspenn-ze hoaz : ne vo ket posubl, ma reer hervez m'emañ skrivet e-barz ar gemennadenn, kelenn yez ar vro 'barz ar C'hwehved klas nemed **adaleg 1983** ar bloaz a zeu, 'barz ar Pempved nemed **diwar 1984**, 'barz ar Bevare nemed e **1985**, hag all... Ha ne vo ket mui neuze kelennet ar brezoneg e-pad ar bloaz-skol zo ' tond,... Setu da nebeuta ar goulenn iskiz a heller ober ma tleer lenn pizig, ger evid ger, skrid **A. Savary**!

Evel-se 'ta, n'eo ket souez ma savas raktal e-leiz a strolladou a-eneb an diskleriadurioù roet gand ar ministr e-unan, d'an 18 a vezeven (ha feal-tre eo chomet peurliesa ar helaouennoù ouz an notenn roet dezo an deiz-se), ha kerkoulz pa oe anavezet ar gemennadenn d'ar Renerien-skol. Ha stank a oe, amañ e Breiz, ar skridou-klemm kaset gand ar strolladou : re **Kuzul Sevenadurel Breiz** da genta, dioustu, tri devez goude komzou **Savary** d'ar gazetennieren, re **Skol an Emsav**, ar **Gelennerien Vrezoneg** (Brest), **Studieren Roazon ha Brest**, an **Talbenn Sevenadurel**. Ha, war a ouezom, skridou all ez eus, hag unañ anezo o veza sinet gand eun toullad mad a dud. Ha dleet eo deom digas ive da zoñj or pennad, — bet mouzet outañ gand ar helaouennoù, — e galleg : **Kousta !a deom henn lavared!** hag e brezoneg : **Eur bloavez all kollet adarre!** (hag a dalvezas da zigarez d'eur Fañch bennag c'hoarzin goap ouz unan ahanom).

E diavêz Breiz ive, e savas dioustu mouezioù e-leiz : a-berz an **I.E.O.** (Skol-Uhel ar Studiù Oksitaneg) hag ar **C.R.E.O.**-ioù (Kreizennou-rannvro ar Studiù Oksitaneg), — o varn garo eur skrid hag a ziskouez kargidi giz-koz ar ministr o honid an tu war meizerez ar Prezidant, — hag a-berz ar strolladou euskareg, katalaneg, alzasianeg, ha n'eo ket echu, — pa welom ar pennad-rebechou savet gand eur gelaouenn a Vro-Bikardi... — Gwir a-wal eo, sindikajou a zo hag eo bet skañvoh o barnedigez, pa gav dezo ez eus eur roud bennag e kelhlizer **Savary** euz ar hinnigou greet ganto da vare kuzuliadeg ar mizioù tremenet. Nemed e verkont skler evelato eo chomet mud ar ministr war ar hredioù, ar yalhadoù ha niver ar gelennerien hag ar skolerien da implij adal miz gwengolo evid ober al labour... Ma vez labour d'ober, gand heuliet pe na vo ket urziou **Savary** evel m'int skrivet!...

Ken stank eo bet ar hlemmoù, an enebadennoù, amañ, e Breiz, ma kavas gwelloc'h Rener Akademiez Roazon komz ouz ar helaouennoù ha lavared ne oa kemennadenn ar ministr nemed komzou-dre-vraz, ha tamm ebed eur « stern reud » o talvoud rik-ha-rik evel m'eo skrivet evid an oll Rannvroioù dezo eur yez. Evid Breiz ne oa tamm ebed **da vond war an a-d.eñv**, nag e-keñver an eurvezioù, nag e-keñver niver ar skolidi... Feiz, gwelloc'h her goud, evel just! Perag avad beza bet neuze diskleriet gand **Savary** e-unan « reolennoù-dre-vraz » o vond ken anad **war-gil e-skoaz an traou evel ma oant kentoh?** Rag piou a gredo nah ez int kemennadurezioù o vond war an tu-gin

hag a zo bet kaset euz perz ar ministr da Renerien-skol Vreiz evel d'ar re all, — kemennadurezioù hag a lakay anezo d'en em zoñjal diwar-benn youl-vad ar gouarnamant da ésaad kelenn yezou ar Rannvroioù!

Doareoù gwall-zouezuz, pa n'heller kompren resisadurioù Rektor Roazon nemed o vond war eun tu disheñvel-mik ouz hini pennadoù zo e notenn ar ministr. Anad eo, aotreet e rank beza bet Rektor Roazon a-benn rei da houd peza zo bet lavaret gantañ d'ar helaouennoù, ha skrivet da-houde en e gelhlizer an 12 a viz gouere evid sioullaad ar sperejou e Breiz endra ma helle. — Re skler eo, koulskoude, ne vo sioullaet an dud dre amañ, evid peza zell kudenn ar brezoneg, nemed pa vo bet embannet divizoù reisoù, efedusoh evid lakaad kelenn or yez pa zigoro ar skol a-nevez, e miz gwengolo 82. — ha n'eo ket e 1983 pe er bloavezioù all da heul... Ha, da genta tra, dre groui ar hant hanter-kant post goulenet gand ar **B.R.E.I.S.** ha gand ar **Sindikajou** evid lakaad kelenn brezoneg ha galloeg en eun darn da nebeuta euz or bro.

Amañ, Emgleo Breiz.

Per TREPOS

Enquêtes sur le vocabulaire breton
de la ferme.

An douar, ar binviji, al labour.
Eur studi talvouduz ha prisiuz.

20 lur digand Brud Nevez (250 g)

Red eo da Savary seveni ar promesaou!

« Erru eo amzer eul lezenn evid yezou ha kulturioù Bro-Frañs, o rei dezo o flas penn-da-benn; erru eo an amzer da zigeri braz-tre dirazo doriou ar skolioù. »
(F. MITTERRAND, en Oriant, 14 a viz meurzh 81)

C'hwezeg miz goude promesaou **Fañch Mitterrand** en Oriant, e Brest, e Hoazon, setu m'emañ **Alan Savary**, ministr an Deskadurez oh embann urziou nevez hag a lakaio kelenn ar Brezoneg ha kultur Breiz **da vond war-gil**, ma vezont lakeet da dalvoud :

– kaset e vefe da 1983 implij an urziou-ze evid kelenn ar brezoneg e-barz ar 6^{ved} klas, da 1984 evid ar 5^{ved}, da 1985 evid ar 4^{ved}...

– ne vefe aotreet kelenn ar brezoneg nemed pa vefe 15 skoliad da nebeuta ha tra ken nemed e-pad eun eurvezriad beb sizun, – pa ne oa merket « minimum » na kont-amzer ebed gand ...**Haby** ha **Beullac**...

– n'eus kelou ebed diwar-benn an arhant hag ar gelennerien da ober war-dro ar helenn brezoneg – tra ma houlenne ar B.R.E.I.S. kroui 150 post-labour da nebeuta.

– ouspenn-ze n'eus ano ebed da groui eur h-**CAPES** evid kelenn ar Brezoneg hag ar Yezou minorezel all...

Evel-se, ma talh **Savary** gand e b-« Plañ tri-bloaz », emañ ar Helenn brezoneg e riskl beza ar bloaz a zeu en eur stad gwasoh evid na oa dindan **Giscard**!

Penaos, neuze, e hellfe ar Vretoned lakaad o fiziañs e **Savary** pa vez o komz euz eur « **statud** » gwirion « **a-berz-Stad** » evid ar Yezou ha Kulturioù-Rannvro?

Red (dao) eo teurel d'an traoñ an urziou a-ziwar-lerh bet embannet gand ministr an Deskadurez! Red eo lakaad en o flas **reolennoù nevez**, euz ar seurt bet goulennet gand Sindikajoù ar Gelennerien, gand ar Strolladoù Kerent ha gand an Emzavioù kulturel! Red eo kroui da nebeuta **150 post nevez evid ar Gelennerien war ar Brezoneg** bet goulennet gand ar B.R.E.I.S.! Red eo kroui eur h-**CAPES brezoneg**!

Red eo lakaad da dalvoud e Breiz **Skrid Emgleo Broioù Europa** evid ar Yezou hag ar Hulturioù Minorezel, bet votet warlene gand Parlamant an Europ!

« Eur vez eo evid bro-Frañs, e vefe-hi ar vro ziweza en Europ o nah d'he Rannvroioù ar gwirioù kulturel bet embannet en « Emglevadegou » (Koñvañsionou) etrevroadel (etre an oll vroioù) ha bet sinet ganti. Eur vez eo na zentfe ket ouz he fromesaou he-unan!¹ »
(F. MITTERRAND, en Oriant, 14 a viz meurzh 81)

Lakit 'ta ho sinatur war lizer-klemm AR GELENNERIEÑ VREZONEG

Milieroù a zinaturioù a rank beza kaset da
F. MITTERRAND ha da **A. SAVARY**!

Notennoù war an anoiou-leh keltieg.

II

Gwern, lenn ha korz.

(*marais*)

Da zivez miz mae 1982 ez eus bet e Dijon eur hendalh diwar-benn an anoiou-leh hag an anoiou-tud evel testeniou war ar yezou eet da get: « l'onomastique témoin des langues disparues ». Eun displegadenn am-oa greet eno war anoiou keltiea ar awerniou e Bro-Hall. Kavet e vo dizale e-touez ar 170 pajennad nevez staget ouz eil embannadur al leor **Les noms de lieux celtiques, 1ère série** e Genève (Slatkine Reprints, da veza gwerzet er Frañs gand Champion, 5, Quai Malaquais, Paris, VI).

N'em-eus ket komzet e Dijon euz ar ger **gwern**, diwar eur stumm kosoh **vern**, anavezet a-walh, hag anavezabl dre ar Frañs a-bez en anoiou-leh evel **Verne**, **Vergne**, **Vernet**, **Verneuil**, **Vernioz**, **Vernois**, **Vemon**, **Vemou**, etc.... An ano a oa da genta hini eur wezenn, **aulne** e galleg, hag a boulz sonn hag uhel en traoniennou gleb. Eur wezenn implijet gwechall en or bro, dre ziouer gwez pin pe sapr, da ober **gwern-iou** « **des mâts** » evid al listri-mor. Setu penaoz eo deuet **Port-Launay** (= **le port de l'aulnaie**) da veza ano galleg **Meill-Wern** (= **Milin ar wern**) war ar stêr Aon e-kichen Kastellin.

Eur wern veuzet a ra eul lenn. Hag eul lenn dizehet a dro e gwern. Ar memez leh a hell beza gwern en hañv ha lenn er goañv, hervez ma ra glao pe heol tomm. E **Allenes-les Marais (Nord)** e chom gwerniou war-lerh al lenn.

En Aveyron, **Saint-Martin-de-Lenne** ha **Saint-Saturnin-de-Lenne** a gaver a beb tu d'ar gêriadenn **Lenne**, dirag eun draonienn ledan ha ne ziveuze morse gwechall goz.

En Dordogne, dirag **Lembras** ez eus foenneier hag a gendalh da ober eul lenn vraz pa bad re ar glaoeier e-pad ar goañv. E **Le Grand-Lemps** (Isère) e chom hoaz eul lenn vraz. **Lens-Lestang** (Drome, komprenit **Lenn = l'étang**) a lavar ar memez tra e diou yez. Med **Lens** (P.-de-C.), gand e lennou bihan e-teid ar stêr Dendre, a gendalh da gomz galianeg rig. Tostoh d'an iwerzoneg koz **lind** (**Dub-lin** pe Du-lenn, kêr-benn Iwerzon, a zo dirag eul Lenn-Du) e chom **Lynde** (Nord), hag ivez **Lindre** (Moselle, **Lende** e 1269) war ribl lenn vraz **Linde**. Ar hembraeg a lavar **Ilyn**.

Er gwerniou e poulz ivez raoz, anvet gwechall goz korz, a zerviche da ober korz-enn-ou. Korz a zo gwregel, evel **cors** e kembraeg. Setu perag, ablamour d'ar hemmadur war-lerh ar ger-mell, e kaver **Gors** e Pleiben, **Gorz** e Ploueskad, ha **Gorzig** e Langoned. An heveleb ger eo a gaver e **Kergorz**, **Kerhors** ha **Penhors**.

Gwregel oa ar ger e galianeg ivez. E komun Nuret-le-Ferron (Indre) ez eus kalz lennou, hag en o zouez **Etang de la Grande Gorce** hag **Etang de la Petite Gorce**, ouspenn **Etang de Cors**. Roud ar ger-mell galianeg a jom, dre ar stumm kemmet war e lerh, war galz anoiou-leh a Vro-Hall evel **Gorce** pe **Lagorce** (Ardèche, Gironde), **Gorses** (Lot), **Gorze** (Moselle). Euz **cors-iacon**, breur d'ar hembraeg **cors-iog** e teu **Corzé** (M. et L., war ribl ar stêr Loir, **Corziacus** e 1036 koulz ha **Gorcy** (M. et M.)).

Kenta tro e welim anoiou all gand ar ger-mell galianeg hag ar hemmadur war e lerh, diwallet e Bro-Hall beteg en deiz hirio. Evel en **A-vignon**, e kembraeg y **fignen** (distaga **oe-vignen**, le marais, euz **mignen**). **Avignon** a grog war ar wern vraz etre ar Rhône ha genou an Durance.

F. Falc'hun.

Tammou traou...

Echu eo rumm kenta amodennou an aotrezeg vrezoneg nevez e Roazon. E leh all ivez? Feiz, bemdez eo deski traou nevez, Marjan.

« Petra 'n diaoul oh deuet amañ da ober, » a houlenñ an aotrou Fleuriot ouz va gweled o tifoupa (e gwirionez eo re zeven da zoñjal lavared « 'n diaoul », me her laka)? « Me 'gonte ho-poa dija eul lastez doktorelez war ar heltieg (re wr, gântañ e labouren warni). « Pez kaer », emezon, « deg devez troh-skol, ha pellaad diouz an Normanted poud. Ha neuze em-oa kiev et e oa ezomm chao. »

Plijusoh saliou on bet oh amodenni enno, sur : dilorñ ar hadonoù, aon ganto mond gand al laer, sur a-walh, pe beza laviget re drumm evel da vare eun abadenn sonerez rog (ar skouarn). Med neuze 'vad, ahe e oa tud vad, paotr paour. An den 'nije bet lakeet eno eur vombezenn da darza, evid amodennou 'zo, e-noa dibennet an emzao evid deg vloavez all.

Awen veur barzed an amzer hen-c'hizel* a oa en on touez ivez. Debarket eun den doh a Vrest gand eur

peziad kleze war e skoaz. Pareo ne ouie ket eo gand stiloù e vez c'hoaniet en amodennou en devez hizio. Eñ eo ivez a gustum en em vruda dre gêr Vrest a-bez evel kelenner war doud ha dreist-oll war n'eus forz petra. 'M-eus aon avad e lenne e herriadur war an tu kontrol en devez ma 'n-oa savet e skritelloù : arabad fasia kelenn vrezoneg ha deski anezañ, beteg re. D'ar poent ma reen war-dro stajou war ar mêz, 'mije kaset eun istrogell evel-se d'eun tiegez, nemed ha desket 'nije troha daou benn artichaod gand eun taol kleze hag o strinka en vanikin diwar lañs e drohadenn. Neuze vije bet rañtabl.

An neb a zoñje oa ez an amodennou n'eo ket bet eno o weled. Meur a skrab penn em-eus-me greet, doktorelez pe get. Disfiziñs 'm-eus ez eus kelennerien war ar vrezoneg, nompaz euz ar Yannigou truil egiston, med en o brud, a vefe bet tapet ken genaoueg haq all. Pegeñ flour e peb bro beza en establishment (anvet nomenklatura e rannyezou 'zo).

* e galleg « dans le texte ».

avatennoù a...
gweled diwar voest
Ranket m'ha liza
eur paotr e-noa
eur skwerenn euz va
displega dezaf e oa
eun tarun mad da
ez d'an dud ha dreist-
ez-se eur rannyez euz
et oa da brena hin
hañs dezaf.

me a zo e-giz skriva-
evel just. O tremen
e oan gand Per Denez,
lennegez vrezoneg,
din diwar-benn Abeo-
ou e oa ar re-mañ mar-
gnerien vrezoneg di-
mañ e-giz yez a-vihan-
yaouank ha va daou
ant a anavezant, hag o-
nezi a-raog ar galleg
Ber Denez e-unan, pa
g he skriv brao-tre.

bet kalz esoh d'eun
d'an oll deskidi en
ki ar yez eged n'eo
eun yez euz v'ez mter
euz leun a v'ez e
d'ez anvet brao tre ar yez
annyez resiz a hellom
ennou da zelaou forz
ing brezoneg war an
evid unan a zo just
a o chom e Breiz-Izel,
resant. Ha neuze, ma
oh galleg, kenkouiz da
abreth eged na ree
Riou ha Youenn Dre-
za disparti kalz esoh
an diou yez eged ma
te, leh n'oa ket gwall
ar studiou yezoniz.
jezo on-eus-ni da lenn
nkiz hag ezamant da
a beb seurt e meur a
eom, forz penaoz.

Memestra eo morgousket an embann brezoneg. 'Baoe m'eo deuet ar Merser war e retred e laka beh war e vizied, hag e pak **Brud Nevez** he dale a-nuzadou. Tra ma teu a-benn **Al Liamm** tost difazi, da ginnig c'hweh niverenn ar bloaz. **Planedenn** avad n'eo ket bet stableet c'hoaz war eun doare resiz : re a niverennou « ispisial » a zo evid ma vefe eur wir gazetenn.

Med aliez e vez eun tammig morzet, kouskidig, inoiz da weled ar pezh a vez pourchaset deom er hazetennou hag el leoriou lennegezh vrezoneg. Ha **Pohl Vreizh** ivez a zo trohet war he lañs bloaz pe zaou 'zo abaoe dija. Ken 'med eun den d'ober e gwirionez war-dro eur gazetenn, lennegezh pe a-hend-all, n'eo ket gwall yahuz, anad eo. Paket e vez buan plegou ha boaziou. Hag inou.

Eun den a clemm er gazetenn ne vez ket greet da leonou **Al Liamm** ar vruderez e-noa bet **An Tri Aotrou!** Re wir. Me 'm-eus lakeet embann pemp leor, braz pe vihan, dija. Mad pe fall, ez eus anezo. Tud **Al Liamm** n'o-deus ket bet amzer pe c'hoant da lenn anezo. Re wir eo ivez. E-leh Youenn Olier a gas din evid netra (bennoz Doue!) e gazetenn **Imbourc'h**, hag a lenn va leoriou (pa 'n-eus re nevez da eskemm ganin...)

Tro miz Mae oan bet er vro evid eur zulvez. Choazet dre zegouez. Med ne ouezfen ket beza choazet gwelloc'h rag teir abadenn euz an dibab em-oa bet tro da weled war-dro parrezig didrouz St Tonan.

Da genta em-oa gwelet film Watkins (eun ano kembread a-walh) diwar-benn emgann Culloden. Eur film e leh ma vez klevet gouezeled o kao-

zeal gouezeleg oa sur da blijoud din. Pe da zisplijoud spontuz, evel ma ra poan din gweled « Little big man » pe « Soldier Blue ». Eur film dispar e peb mod. Ped den er zal e Brest? Ugent! Ma n'ouzoh ket petra eo emgann Culloden, kit da weled : e 1746 e oa, hag eun taol falloch eo bet da zevenadur gouezeleg Menezioù Bro-Skos eged ar brezel 14 a-eneb d'ar Vretoned. Filmet dispar (e-keñver menozioù). Nul, ma'z eo « Autant en emporte le vent » a laka ho kalon da dridal avad.

Da zadom kreisteiz em-oa gwelet « Mona » war an tele. Evid eur wech n'oa ket laeret re an ano « Breiz o veva » ha n'eo ket restachou-mad-zomad-da-gaoud a oa servijet deom war-lerh lein. An istor 'zo ar pezh ez eo na falloch na gwelloc'h eged kalz, med evid ar wech kenta eur filmig greet a-feson e leh oa implijet brezoneg a-feson en eun endro euz on amzer-ni. Fiziañs 'm-eus ez aim kalz pelloc'h, med va gwella gourhemennou evid an abadenn-mañ, hag en-ispisial d'an daou baotr, Goulhen Kervella hag Iv Meudeg.

Ha da noz « Spontuz Circus » e Lezvenen.

Ne blij ket din mond d'ar sirk. N'ouzoh ket perag. Pa zellan em memor ne gavan ket perag, med gouzoud a ran bremañ eo e gaou. Petra skriva? « Dispar » adarre. Pebez gwikentad sevenadur!

En deiz all on bet en unan euz bodadennou ar neñ sevenadurel normaneg kreifa 'zo (Université normande populaire, Cherbourg). An dud a gaozee galleg toud, an eil re gand ar re all (e kêr e oant, kea), n'oa tost da vad nemed retredidi.

Lenn a reent eun destenn skrivet e normaneg, ha dibuna eun tamm glaouiadenn vemor. Ha sinkan ganto hardi war zistagadur (ha doare-skriva!) ar ger-mañ-ger er barrez-mañ-parrez. Me 'gave din beza en eur vodadenn all : hini kelh sevenadurel brezoneg Montroulez, deg vloaz 'zo. Eno oa bet souezet maro an dud pa 'm-oa kaozeet brezoneg outo! Ne re-

ent nemed lenn testennoù skrivet e brezoneg, o zrei e galleg ha kaozeal diwar o fenn e galleg.

Bremañ pa deuan da Vro-Leon e ouezan petra eo birvill eur zevenadur o stourm hag o paka lañs evid beva.

Mikael Madeg.

R. GERALLT JONES

CAFFLOGION

bet lakeet e brezoneg gand

J. ABASQ

Eul leor skiant-faltazi!

Priz kenta an Eisteddfod, 1979

10 lur (150g)

Notenn : ne vo embannet al leor-mañ nemed goude an hañv.

Pladennou

The Brendan Voyage

Berz e-neus greet, en eun doare dreist, sonerez ar **Brendan Voyage** en hañv-mañ e Breiz, ha se, moarvad, dre m'eo bet c'hoanet dre ziou wech e-pad ar goueliou braz, eur wech e Roazon hag eun eil gwech en Oriant. Med abaoe ar bloaz tremenet, e veze klevet aliezig a-walh sonerez **Shaun Davey** war ar radio, dreist-oll en abadennoù brezoneg.

An istor a zo kontet war ar bladenn eo hini an abad iwerzonad Brendan, hag a zo sañset da veza treuzet ar mor Atlantel er 6ved kantved war eur vagig greet gand ler ar strad outi. N'eus ket pell 'zo, e-neus klasket **Tim Severin** gweled hag-eñ e oa posubl treuzi ar mor Atlantel e bourz eur seurt bag ler, hag e istor e-neus kontet just a-walh en eul leor anvet **The Brendan Voyage**, da lared eo **Treiz Brendan**.

D'e dro e-neus Shaun Davey savet eur pez-sonerez war an tem-ze. Setu ma'z eo eun istor kontet gand toniou. Brao eston eo da zelaou.

Santet e vez warnañ levezon muzisianed deuz fin an 19ved kantved hag o-deus klasket, hag a zo deuet a-benn, da skeudenna ha da zispiega an natur dre o muzik : da skwer, **Smetana** hag e-neus skeudennet ar stêr Moldau en e vuzik, med ivez tud all 'giz **Dvorak**.

Implij a ra S. Davey a-hend-all doareou-ober a vez klevet aliez e-barz muzikou-film. Da skwer, p'ema ar vagig en Iceland, eh implij kendoniou skrijuz eun tamm, evid rei da zantoud n'ema ket mab-den en e êz en eur seurt andread.

Implij a ra c'hoaz ar memez kendon pell a-walh (eun tamm evel war ar biniou, a vez klevet warnañ dalhmad son ar hermiel-boud), ha war ar hendon-ze, vez klevet neuze eun ostimato, eul lusk berr a-walh c'hoariet meur a wech deuz renk.

Meska a ra S. Davey tri stumm muzik : ar zonerez klasel (dre al laz-seni simfonig), ar zonerez iwerzonad (dre

an toniou-gwerz hag an toniou-dans), hag ar zonerez jazz pe pop euz an amzer-vremañ (dre daboulinou). Alan Stivell ivez e-neus kemmesket ar stummou-ze, ha gweloh eo, a gav din, nompaz kaoud klouedou etrezo.

Abalamour d'an oll draou-ze, n'eo ket **The Brendan Voyage** eur muzik diêz da gompren, ar honter 'ni eo, ha setu perag e plij da gement a dud.

E-keñver an doare da skriva ar muzik, ne implij ket Davey doareou an amzer a-vremañ (nebeutoh evid Stivell, da skwer) : n'eo ket tra-walh lakaad eun daboulin-bop gand eul laz-seni simfonig evid beza modern.

Med an ulean-pipe o son gand eur seurt laz-seni, evidon, a zo nevez. Ar plas kenta e-neus en oberenn-mañ. An ilin-pipe eo ar vagig vihan hag al laz-seni simfonig ar mor braz endro dezi. Dispar eo sonet an toniou gand

Liam O'Flynn Dond a ra a-benn da lakaad ar zelaouerien da zantoud ar pez a zant e-unan, en eur lakaad e venveg da gana, da skwer, gand notennou hag a gomañs « dous » a-walh, hag a ya tamm-ha-tamm war greñvaad (ar pez a vez anvet « glis-sando », er muzik).

Gwall-vad eo ivez al laz-seni renet gand **Noel Kelehan** hag enrollet mad eo bet ar bladenn ouspenn.

Sed ez eo **The Brendan Voyage**, en oll, eur bladenn plijuz-tre da zelaou, hag eur muzik êz da gompren, med 'benn ar fin, pas ken nevez-se ha ma seblant beza. An oll re ha n'int ket bet en Oriant pe e Roazon o zelaou ar pez sonerez-se a rank zelaou ar bladenn da nebeuta. (1)

(1) Lakeet eo bet da zond er-mêz gand ar merk Tara, ha skignet e vez e Breiz gand Keltia-Muzik deuz Kemper.

J. Goyat.

Kristian BRISSON

AR REDER-MOR

Romant pe varzoneg?
Deoh da varn!

25 lur digand Brud Nevez (kuit a vizou kas).

Notenn : ne vo embannet al leor-mañ nemed goude an hañv.

Radio

France-Musique

Eisteiz e Breiz

Euz al lun 23 d'ar zul 29 a viz eost, ez eo bet skignet ar bevrvasa euz abadennoù ar chadenn radio **France Musique** war-eeun euz Breiz ha dreist-oll euz Brest. N'ouzon ket piou e-neus bet ar menoz, pe eo eur Breizad bennag, pe eo tu **France-Musique** o-unan, med eur menoz euz an dibab eo bet.

Rag a-hed ar zizunvez-se, ez eus bet tu da glevet er post bihan (pe... war eur chadenn Hi-Fi!) ar pezh ne oa biskoaz bet kinniget deom war radio ebed : kazimant kement seurt muzik ha kement seurt kan deuz a Vreiz, pe e-neus da weled gand or bro. Eur wir dro-Vreiz on-eus bet an eurvad da heulla : eun dro hag on-eus greet en amzer dremenet, koulz hag euz eil penn d'egile d'ar vro en deiz a hiro.

Bed abardaez, da skwer, e veze kinniget eun abaden euz eur gêr bennag : euz an Naoned, Roazon, Kemper, pe Sant-Brieg... An digarez a oa

ze n'eo ket hepken da weled e peleh ema erru ar muzik er gêr-ze ha tro-war-dro, dre berz pennadour-kaoz, frapadour-muzik sonet gand tud euz ar gêr-ze, mez ivez da gaoud eur pol-tred euz eur mestr-muzisian bennag euz ar horniad, da skwer hini Guy Roparz pe hini Paol Ladmirault.

Ha bewech eo bet kazimant eun « dizoloadenn » evid kazimant an oll, zoken evid komzertien **France-Musique**. Na pegen souezuz ne oa ket glevet unan anezo o rei da houzoud e oa eul laz-seni euz Boston, e Stadou-Unanet an Amerik, o vond d'enrolla prestig peziou-sonerez gand Ladmirault, hag e oa, emezañ, eur « skandal » e vije bet red dezañ dond da dremen eisteiz e Breiz evid kompren ne hoaner morse ar peziou-ze a-hend-all, daoust d'an dalvoudegez a hell beza o hini.

Diouz an abardaez, e veze klevet, eun eur bemdeiz, peziou bet savet gand Bretoned euz on amzer, hag a

zo anezo muzisianed, pe gentoh son-aouzourien ha ne vez ket a dro da glevet gwall-aliez a-hend-all, na pa vez ken nemed dre ne vez ket sonet nemeur ar muzik a-vremañ. Roet e-neus e-giz-se Marc Texier da glevet obere-nnoù gand tud hag a anzav int gwizennet e Breiz pe ez int levezonet gand o bro, evel Jef ar Penven ha Gérard Pondaven (anavezet mad a-walh dre amañ), mez ivez evel Jean Langlais (brudet braz e diavéz d'e vro, med a oa bet klevet evelkent eur pezh ograou gantañ en eun abaden **Breiz o veva** a-raog an hañv, hag a zo bet rentet enor dezañ e Roazon e miz gouere da geñver ar goueliou « Les Tombées de la nuit », Even de Tissot ha Peng Herbert (hemañ o veza eur Breizad euz Clichy anezañ, ma 'm-eus soñj mad, hag e-neus savet a-hend-all eur geriadur brezo-neg euz ar zonerez).

Med e memez abaden M. Texier, on-eus bet tro da glevet kerkoulz all peziou bet savet gand Bretoned c'hoaz, a vez diskleriet sklêr ganto avad, ar re-mañ, n'eo ket bet levezonet o muzik gand o bro : J.P. Guézec, da skwer. A-hed ar vintinvez ivez, dindan an talbenn **ar mojennou keltieg hag ar muzik**, e veze roet deom da glevet er memez mod sonerez gand Wagner, Purcell ha Lalo.

Med kaeroh e-neus greet c'hoaz **France-Musique**, o rei an tu da bemp muzisian a-hiro da zével eur pezh, esperez-kaer da geñver ar zizunveziad-ze. Bemnoz, war-dro deg eur, on-eus bet tro da glevet en abaden Pierre Tardy, peziou nevez bet kompozet gand tud evel Jean Schwarz, Nellu Cohn, pe re all, diwar eur skrid hag a anavezem dija. Skridou euz « Barzaz Breiz », pe diwar bliuenn P.J. Helias, pe diwar hini... Lautréamont, on-eus bet ar blijadur da glevet muzik warno : ar blijadur, pe a-wechou

ar zouezaden... Sed aze da nebeuta eur skoazell a-zoare d'ar grouerien.

E-leiz a draou all on-eus klevet c'hoaz. Abadennoù muzik skignet war-eeun euz auditorium skol-vuzik Vrest, unan da skwer gand an Universal Music Ensemble. Eun dro euz a beb seurt goueliou, evel hini an Oriant e-pad ar zadom a-bez tost da vad. Sonerez klasel c'hoaried gand Bretoned a orin, evel Anne Queffelec. Sonerez jazz euz an nozveziou a oa bet nebeud a-raog e kastell ar Roh-Ugu, pe war-eeun euz ostaleri ar « Chupenn Bar » e-tal Brest, gand Bretoned pe gand sonerien a-zivéz.

Hag ez eus bet neuze, bemdeiz da greisteiz, an abaden-ze dindan an talbenn : **Concert de musique traditionnelle**. Mesk-ha-mesk, eo bet roet da glevet tro ha tro Youenn Gwernig ha Patrick Ewen, J.F. Qué-mener, sonerien daou-ha-daou, Andrea ar Gouilh, Kristen Noguès, ar Zonerien Du... Da lavared eo, sonerien ha kanerien hag a vez klevet ganto, a-dra-zur, « sonerez 'giz ar vro » (evel a vez laret...), med disheñvel-tre an eil re diouz ar re all, pa ne ra lod nemed kana pe adkana ar zoniou nag ar gwerziou koz (bet kempennet ganto, pe bas), e tro keit ha ma vez savet toniou nevez a-grenn gand lod all. Med skigna kement-mañ toud dindan an talbenn « traditionnelle » ne zere ket, d'am zofj.

Rag n'eo ket prest an oll re a zo bet klevet en abaden-ze da veza ken « traditionnel »-ze, diouz eun tu. Ha diouz eun tu all, e diavéz J.F. Qué-mener (hag eo ispisial evitañ, peogwir ema tamm pe damm e renk ar ganerien a vez diouz o micher), n'eus morse bet klevet eur haner e 'giz gwechall », pe « hengounel », ha dipituz eo kement-mañ. En eun abaden all, ez eus bet klasket rei deom

da glevet ar Vreudeur Morvan, heb d'ond a-benn. Med na ped ha ped all ne vije ket bet tu da skigna evel-se, pe kanerien kan-ha-diskan, pe kanerien a-boz : mankoud a ree kement-mañ, a gav din.

Traou all a zo bet kerse dezo. Da skwer, pa'z eus bet kaoz euz Kenstrivadeg ar Bagadou en Oriant, n'eo bet klevet ar muzik nemed dindan komzou tud o kaozeal. Meur a wech eo oa a-hend-all komzerien **France-Musique** gand o spered « dizoloerien », evel ma rankje peb kaner beza bet « dizoloet » gand unan bennag pe en eun tu bennag. Eur skwer nemetken, hini Kristen Noguès, hag eo bet lavaret d'ar zadom vintin diwar he fenn e ree muzik euz ar gwella kalite (pez a zo gwir), ha n'he-doa ket bet ezomm da vond da Bariz da honid brud (pez a zo gwir bepred), med a oa bet « dizoloet » gand **Komite Gouel Etrekeltieg an Oriant**. Moarvad e-neus a-wechou sikouret komite an Oriant da « zizoloi » kanerien 'zo. Med telennourien evel Kristen Noguès o-deus en em roet da anaoud o-unan, sur ha n'eo ket marteze (ha gand poan a-wechou) ha n'o-deus morse gortozet ken e vije bet roet dezo e vennoz gand hemañ pe henhont evid mond war-raog. Ha na ped ha ped all evel-se.

A-benn ar fin, e oa re fonnuz ha re

stank an eisteiz-se war **France-Musique**. Ouspenn unan a zo bet ha n'e-neus ket gallet chom peg e skouarn ouz e bost 'pad an deiz da baka peb tra. Med arabad klemm euz re. Diskouez o-deus greet an oll abaden-nou-ze da nebeuta e oa ar Vretoned muzikerien ha kanerien, hag eo lies-seurt ar zonerez hag ar han en or bro. Ar pezh e-neus manket en abaden-nou ivez eo marteze n'eus ket bet diskouezet a-walh peseurt hekleo o-deus, pe n'o-deus ket, an oll stummou-muzik-se e-touez an dud : eur poent euz ar brasa pouez eo hemañ koulskoude.

Peseurt digemer a hell beza bet greet d'an eisteiz abaden-nou-ze, e diavéz Breiz? An hini on-ije greet marteze ma vije bet kinniget deom kemend-all diwar-benn eur vro all bennag. Ha dre amañ? Komzet ez eus bet kalz anezo da vihanna, setu ez int bet selaouet, moarvad. Diskouez o-deus greet ivez n'eus ket da dabal-tal re endro d'al lavariou : « création bretonne » ha « création en Bretagne ». Pa grouer eun dra bennag e Breiz, pe e vefe anvet « danvez Breiz » en eur ster striz, pe ne vefe ket, eo eun dra bennag euz ar vro bepred... Sed aze ar pezh a dleje eur wir radio ahann beza gouest da ginnig d'he selaouerien penn-da-benn ar bloaz.

J.S.

